

— NAIG ROZMOR —

KANT ISTOP
FAR SUZ



— EMGLEO BREIZ —
BRUD NEVEZ

NAIG ROZMOR

KANT ISTOR FARSUZ

**EMGLEO BREIZ
BRUD NEVEZ**

Bet embannet gand skoazell
Skol Uhel ar Vro

Golo gand
J.P. Mellouet
(Tresadenn Graphic)

Bet embannet gand Brud Nevez, 6, ru
Beaumarchais, 29200 Brest.

Bet moulet gand Mesidou, 40bis ru ar
Republik, 29200 Brest.

Bet diskleriet hervez al lezenn : trede trimiziad
1989.

Peb gwir miret striz.
I.S.B.N. : 2-86775-070-9

Salud dit va abid kloun!
Va goudorenn varzuz,
Va meurlarjez peurbaduz,
Repu ha baradoz va halon.
Salud dit!

Ha te, va maskl a remed-oll
Achantour an nozveziou teñval,
Te, ha ne houzañvez ket an daelou,
Te, hag a oar argas diouzin peb glahar
Salud dit!

Eur gerig en a-raog

Euz peleh e teu an istoriou-mañ?
Piou 'deus savet anezo?
Diêz da respont.

Dre vraz seurt istoriou a jom dibershenn, tamm-ha-tamm e teuont da veza peadra ar bobl hag eun testeni euz he yhed hag he laouenedigez.

Techet e vezont avad, da derhed diouz or spered ken buan ha ma tigouezont e-barz. Trumm int evel al luhed, kerkent klevet, kerkent ankounac'haet... nemed skrivet e vefent evel just.

Evid dastum ar re-mañ on bet sikouret gand va mignoned, gand va bugale ha dreist-oll gand va hoar Jeanne, he-deus ouspenn, kemeret ar boan d'o zamouezad ablamour da zilamm ar re hrosa diouto.

Da bep hini e lavaran trugarez euz a-greiz va halon.

Naig Rozmor

Al lizerenn "A"

Eur vamm-goz a zo o verka dillad he bugale-vihan da vond d'ar skol-loja med ne verk warno nemed atao al lizerenn "A".

He amezogez a houlenn diganti:

—"Arsa, Chani, perag e verkez atao al lizerenn "A" war dillad da vugale vihan?"

—"Ne ouzon brodi nemed al lizerenn-ze, kêzig, med forz penaoz, anoiou va bugale-vihan a gomañs toud dre al lizerenn "A".

—"Pe ano 'deus da vugale-vihan 'ta, Chani?"

—"Arsul, Arnest, Añri... n'eus nemed an hini bihanna, ne hellin ket merka e zillad dezañ rag hennez zo e ano August."

Promesaou tra kén

Eul labousig bihan diwar ar mêz a zo eet da Bariz da weled e genderv n'e-noa ket gwelet pell 'zo.

Kaoud a reas anezañ treud-gagn.

—"Petra hoarvez ganez? N'eo ket êz beva tro amañ 'vid doare?"

—"Feiz nann."

— "Me gave din 'oas war ar bern en eur gêr vraz evel homañ."

— "Fazia 'rez."

— "Penaos? Kemend-all a girri-dre-dan a zo er strêjou, ne vez klevet ano nemed euz niver o hezeg: 5 chevaux... 8 chevaux... 15 chevaux!"

— "Hañ, a gav dit? Ar hezeg-se ne reont nemed strakal, ne abounont ket!"

Leskit 'o ⁽¹⁾

An aotrou Person a oa er gador-zarmon o skanbenni war e barrezioniz:

— "Toud e vezoh daonet, emezañ, pegwir n'en em garit ket etrezoh... ne garit ket ahanon-me zoken pa ne lakit gweneg ebed er plad... d'an ivern ho-peus da vond."

Hag eñ staga da zisplega poaniou an ivern: Diaoulou droug e pep korn o vrouda ar re zaonet gand o ferhier, tan ha moged, netra da eva... ha fin ebed d'o zourmant.

E lost an iliz oa unan o c'hoarzin 'pez ma helle tra ma kleve ar person o tisplega.

— "'Peus ket a véz o c'hoarzin pa glevez petra or-beus da dapa", a houlenas sioul e amezog outañ.

— " O!, a respontas, gwaz a ze evidoh, me ne ran ket a forz, n'on ket euz ar barrez."

(1) leskit 'o : leskit anezo.

Kentel ar helenner meur

Eur helenner meur a zo oh ober eur brezegenn diwar-benn ar helien.

— "Gwelit ar gelienenn-mañ, emezañ, ma lavaran dezi nijal, e nijo."

Hag e strak e zaouarn; kerkent ar gelienenn a nij.

Da houde e tenn eun askell d'ar gelienenn, e strak e zaouarn, ar gelienenn a nij adarre. Er fin, e tenn he askell all d'ar gelienenn baour, e strak e zaouarn, med kaer e-neus ordren dezi nijal, ne nij ket.

— "Setu ar pezh a ziskouez deoh frêz, eme ar helenneur meur, eur gelienenn, pa vez tennet he diouaskell dezi, a deu da veza bouzar."

C'hoari geriou

Chani a zo o halver he fried da zond d'e lein:

— "'Politig ⁽¹⁾ da lein!" emezi.

Hag eun douristez da lavared:

— "Kaer 'm-eus mond, n'eus ano nemed euz ar politik vrein-ze, eur skuizder eo!"

(1) Politig : Hipolit, berraet.

Istor ar melezour

Tonton Chob ha tintin Mari a zo o talher eun tiegezh bihan e Boneur, en eul leh distro meurbed, setu, anad deoh, ne welent let kalz a dud o rodal tro eno, ken e oant deuet da veza gouez a-walh o-unan.

Ouspenn, dre ma n'o-doa ket a vugale, n'o-deveze ket kalz a vizitou kennebeud, kea?

Memestra, eun niz o-doa hag a oa misioner er Hameroun. En hañv tremenet eo bet e permission hag, evel just, eo bet oh ober eur weladenn da donton Chob ha tintin Mari. Nag eo bet resevet mad ganto! Kement tra vad a oa en ti oa bet lakeet dezañ war an daol: bara mouchenn, amann frésk, fourmaj-penn, krampouez, kafe-lêz ha gwinardant... Ha marvaillou, ha plijadur forz pegement.

Pa oa echu gantañ e bermision, ar misioner a zistroas adarre d'ar Hameroun.

Neuze avad e savas keuz ennañ ha nehamant zoken. Soñjit 'ta, n'e-noa ket roet an disterra prof da donton Chob ha tintin Mari, ken brao-all oa bet digemeret ganto!

Petra da ober bremañ? Penaoz en em dapoud? Dre forz prederia, e tivizas kas dezo eur prof dre ar post. Hag eñ e kêr da brena eun dra bennag vrao.

A-benn ar fin, e-touez an oll draou kinniget dezañ, e tibabas eur melezour.

Ya, gwelet e-noa e vanke eur melezour e ti e

gerent, pegwir diouz ar mintin, tonton Chob, evid dilamm e varo a ranke digeri ar prenest ha selled er werenn da weled e labour a veze greet peurliesha diskempenn a-walh.

Setu prenet ar melezour, greet ar bakadenn gand kalz a aket ha kaset d'an ti-post.

Pa erruas ar prof e Boneur, ne oa nemed tonton Chob er gêr; tintin Mari oa eet da ziwall ar zaout da Doullig-ar- Raned.

—"Mad, eme Chob, evidon-me ne hortozin ket Mari da zond en-dro evid digeri ar bakadenn-mañ... N'eo ket bemdez e teu ar fakteur beteg amañ.

Hag eñ, buan-ha-buan, da drehi fisel ha paper.

Ar melezour a oa en e bez, n'oa na torret, na faoutet, a-drugarez Doue.

Chob a grogas ennañ gand doujañs hag a zellas e-barz.

—"O! emezañ, poltred va zad! Feiz, me 'zo kontant; abaoe an amzer m'eo maro ha n'em-boa poltred ebed dioutañ!"

"Daoust hag e peleh e vezo lakeet? Amañ marteze e-kichenn ar Galon-Zakr? Pe amañ war dêz ar gwele-kloz e vije muih er sklerijenn.

Ya, med eur gudenn 'zo... Mari ha va zad, Doue e bardono, ne oant ket evid en em weled, atao e veze cheu ganto; setu bremaig, pa welo Mari poltred va zad, e yelo droug enni adarre ha ne dalv ket ar boan... Mond a ran d'e guzed a-raog ma teuo d'ar gêr gand he saout."

Ha Chob da galatrez ar marchosi.

—"Amañ, emezañ, Mari n'eo ket bet pell 'zo, re bonner eo he foñs evid pignad er skeul voan-mañ."

Bremañ, Chob a veze bemdez dre guz oh ober eur zellig ouz poltred e dad hag e veze laouen evel ar Spered Santel pa ziskenne euz e galatrez.

A-benn ar fin, Mari, ha n'oa ket sod, a grogas disfiziañs louz enni.

—"Petra ar foultr a vez hennez oh ober dre laer bemdez er halatrez? Me a ouezo, eme Mari; marteze en-devez "rendez-vous" eno gand eun "nana" bennag!"

Kenta tro ma yeas Chob d'ar waremm bella, setu Mari d'he zro, da galatrez ar marchosi... Gwir oa moan ar skeul ha ponner he foñs, memestra eh erruas dibistig er zolier.

Kerkent eo kavet ar melezour, harpet braoig eno ouz ar voger. Ha Mari da dapoud krog ennañ... ha da zelled outañ...

—"Ahanta, emezi, me a ouie, homañ eo neuze! Mad! eun tamm mad a benn divalo a zo outi!"

Eun dén mezo-dall

'Barz eun ostaleri, an ostiz a zo droug ennañ.

—"Nann, emezañ d'ar pratik diweza, n'e-po banne ebed ken rag mezo out; kee d'ar gêr bre-mañ".

—"N'eo ket gwir, eme al lonker, n'on ket mezo."

—"Pa lavaran dit out mezo-pud, ne welez ket sklêr zoken; bremaig e lavares din oa daou brenest war an ostaleri pa n'eus nemed unan."

—"Ya, bremaig marteze, med bremañ e welan mad adarre; sell aze, e toull an nor ema da gaz du o tond en ti; gweled mad a ran e zaoulagad."

—"Pa lavaran dit out mezo-dall! Ar haz n'ema ket o tond en ti, o vond er-mêz eo ema."

Ar "moñtr-bracelet"

Izidor e-neus c'hoant prena eur "moñtr-bracelet" d'e wreg evid he gouél. Siwaz, n'e-neus ket kalz a arhant! Penaoz ober neuze? Marteze e hellfe paea anezañ gand viou?

Hag eñ da zastum eun dousenn viou frésk hag e kêr ganto. Mond a reas war-eün da di eun orolacher.

—"Daoust hag-eñ ho-peus "moñtchou- bracelet" evid ar merhed? " emezañ.

—"Evel just, va dén mad; mond a ran d'o diskouez deoh"

Izidor a zibabas an hini braoa, unanig bihan ha koant.

Anzav a rankas neuze e gudenn.

—"Red eo din paea ahanoh gand viou."

—"Opala!" eme an orolacher, "amañ ne vez ket greet aferiou evel-se, va gwreg a vez er marhad o prena viou pa fell dezi, ha mad pell 'zo."

—"Dipituz eo, rag n'on ket evid ober e mod

all."

Hag eñ kuit.

An orolacher ha n'e-noa gwerzet netra abaoe ar goañv, a halvas e bratik en-dro.

—"Mad, evid eur wech e roin deoh ar moñtr evid viou. Pegement an dousenn ganeoh?"

—"Deg lur; ar re-mañ n'int ket viou faoz int, med viou frésk ha yah e-giz gwechall; ha pegement ar moñtr?"

—"Mil lur."

—"Penaoz, mil lur? Ha deg lur hepken an dousenn viou?"

—"Feiz ya, va dén mad; soñjit nag a studi a zo red a-benn gelloud ober eur moñtr... tri bloaz da nebeuta!"

—"Hag evid ober eur vi, pegeid studi a zo red, a gav deoh?"

Ar boutou-koad

An istor emañ o vond da gonta deoh a zo gwir-bater. Erruet eo bet zoken tostig euz ahalenn, med ne lavarin ket deoh e pe leh.

A-raog ar brezel oa. Havelina ha Fantig, diou vaouez yaouank c'hoaz, a oa o kanna war vord ar poull, marvaillou ganto forz pegement.

—"Arsa, eme Havelina, penaoz e rez-te da gont evid nompaz kaoud bugale? Soñj e-peus om dimezet er memez bloavez hag abaoe, te n'e-peus bet nemed daou a vugale ha me am-eus tapet

pevarzeg!"

—"Mad, eme Fantig, ma karfes ober eveldon-me, n'e-pefe ket ken."

—"Penaoz e rez 'ta?"

—"N'eo ket diêz, lakaad eur boutou-koad da vond da gousked."

—"Hañ? Te, eur vaouez ken dilastez all a ya d'az kwele boutou hag all?"

—"Ya, med gand eur boutou-koad nevez."

—"Piou e-neus desket an dra-ze dit?"

—"Va zad-kaer hag a oa boutaouer; setu kredabl e ouie petra lavare."

—"Mad, neuze me 'zo o vond da brena eur re dioustu, rag gand an hini a zu-mañ a-hont, ne ouzon ket ken petra da ober... a-walh e vez dezañ teuler e vragez war ar gwele m'emaon flemmet!"

Hag Havelina war-eün d'ar bourk da brena eur boutou-koad nevez...

Diouz an noz, p'edo o vond da lammed en he gwele, he gwaz sebezet a houlennas diganti:

—"Petra ar foultr a hoari ganez-te. Eur boutou-koad a lakez da vond da gousked? Biskoaz kemend-all!"

—"Ro peoh ha léz ahanon da ober, evel-se n'em-bezo ket ken a vugale."

Hag an daou bried d'o gwele dizoursi... ha beh adarre!

Siwaz, tri miz da houde, Havelina a oa dougerez eur wech muioh!

Droug enni evel just, e yeas buan da gaoud he hamaradez.

—"Gaouiadez, emezi, lakaad ahanon da ober mizou eur boutou-koad nevez ha n'int talvezet da netra!"

—"O gast! Ankounac'haet am-boa lavared dit, arabad trehi al las".

Ar zuterez

Eur vamm yaouank a zo o walhi he bugale.

He merhig, pevar bloaz dezi, a houlen diganti:

— Mamm, perag Jakig e-neus eur zuterez aze?

— Perag? Ablamour Jakig a zo eur paotr.

— Mamm, me fell din kaoud eur zuterez ivez...
ha blej!

— Ro peoh 'ta, pa vezi braz e-pezo unan ivez...
ma vezez fur. Ma ne vezez ket e-pezo kement ha
ma kari.

Lost ar hi

—Perag e-peus trohet lost da gi? a houlenne
Pèr digand e amezeg.

— Feiz, ablamour ma teuio va mamm-gaer
amañ da leina warhoaz.

— Ha neuze?

— E mod-se ne ficho ket anezañ da ziskouez
dezi eo kontant.

Va gwreg ha va dous

En hañv tremenet, daou waz o ruza o zreid war
vord ar mor en em lakeas da varvaillad asamblez.

— Sell 'ta, eme unan, ne welez ket an diou
vaouez a zo a-hont war an aod? Mad, an hini 'zo
gwisket e glaz eo va gwreg, hag an hini 'zo
gwisket e ruz eo va dous.

— O aï aï! a respontas egile, hag evidon-me eo
ar hontrol-beo!

An istor ne lavar ket pe oant chomet mignoned
pe ne oant ket.

An den ne ouie ket neu

Eur wech oa eun den o pourmen 'hed ar stèr
pa welas eur gwaz kouezet en dour hag a youhe :

— Sikour! Sikour! Me n'ouzon ket neu!

— Ha neuze? Me n'ouzon ket ivez ha n'eus ket
kement-se a youh ganen, a respontas an hini a oa
war ar zeh!

Ar « gref »

Ar re yaouank hirio a zo dirollet, n'eus diaoul
ebed ken evito; re a herr a lakont.

E-kichenn du-mañ 'z eus eur paotr yaouank hag
a zo eet a-benn en eur voger gand e voto...

frigaset nêt e harr ma'z eus ranket "grefi" dezañ eur harr all!

Pa oe deuet ar poent da operi anezañ, ne oa kavet nemed eur harr vaouez da staga outañ.

— Pez kaer, eme ar medisin, n'eus ket amzer da goll; forz penaoz, pa vezo e vragez gantañ, ne vezo ket anad.

Ha greet al labour... ha greet mad, me lavar deoh. Ar paotr-yaouank-se a laka herr adarre... Petra eo ar "progrès" memestra!

Bloaz da houde, ar medisin a houlenas digand e bratik :

— Ha neuze, va faotr, kudenn ebed gand da harr nevez?

— Nann avad, emezañ, nemed pa yan da stroaza, va garr nevez a gustum plega hag eben a jom sonn evel a- raog.

Ar marhadour rochedou gwazed

— Petra 'maout o werza aze, Pèr?

— Traou euz ar hiz nevez evel n'eus ket gwelet c'hoaz : rochedou gwazed bouton ebed outo.

— Traou euz ar hiz nevez, emezout? Ganen-me ez eus ar seurt-se tregont vloaz 'zo, abaoe ma'z on dimezet.

Ar paotr-yar

Eur vaouez a deu da gaoud ar medisin gand he mab, eur paotrig eiz vloaz pe war-dro.

— Petra 'zo nevez? eme ar medisin.

— Evid va mab eo, aotrou medisin; soñjit 'ta, hemañ 'gav dezañ eo eur yar.

— Hañ?

— Ya, ne zreb nemed greun ha ne fell dezañ kousked nemed e klud ar yer.

— Gwir eo kement-se, va faotr?

— Kod... kod... kod..., emezañ.

— Pe ano 'peus?

— Kod... kod... kod...

— Biskoaz n'em-eus gwelet kemend-all! Ha pegeid 'zo ema er stad-se?

— Pemp bloaz bennag 'zo.

— Pemp bloaz, ha n'oh ket deuet kentoh d'am haoud?

— Feiz nann. Petra 'fell deoh, aotrou medisin, va gwaz a oa dilabour beteg-henn, setu eur vi bemdez a zikoure kalz ahanom.

Chamar

Souezuz eo memestra, Chamar! Gwechall n'em-beze ket amzer da denna va loerou ganez, ha bremañ em-bevez amzer da ober anezo!

Ar breur bihan

Eur vamm a zo en ospital, bet eun eil krouadur dezi. Kaset eo Ifig da ober anaoudegez gand e vreur bihan.

— O! emezañ d'e vamm, hemañ 'zo ridellet toud!

— Natural eo, a respontas ar vamm.

— Ha perag 'n-eus ket muioh a vleot?

— Natural eo ivez.

— Ha perag 'n-eus dant ebed en e henou?

— Natural eo atao.

— O! Mamm, 'meus aon 'z eus roet unan koz dit!

An istr

Eun den e-neus bet istr da zrebi evid ar wech kenta.

En dervez war-lerh eo klañv spontuz, ken eo red galver ar medisin.

— Sur eo on klañv diwar an istr, eme an dén.

— Arsa, n'ho-peus ket santet c'hwez fall ganto p'ho-peus o digoret?

— Penaoz? Digeri 'ranker anezo?

« Deux amants »

— Mamm, eme eur paotrig, petra eo "deux amants"?

— 'Peus ket a véz o lavared traou vil evel-se?

— Mad; neuze, mamm-goz a zo eur vaouez vil.

— Petra lavarez?

— Pa vezan ganti o tiwall ar zaout, ne baouez ket da lavared : "deux amants... deux amants"

— Ya, deus amañ!

Paotr e vlevenn nemeti

Eun dén ha n'e-noa ken nemed eur vlevenn war e benn a gemere aket spontuz diouti.

Mond a reas eun deiz da di ar perukenner :

— Gwalhit din va blevenn, emezañ; berrait anezi ha lakit c'hwéz-vad outi.

Ar pez a oa greet dillo a-walh, anad deoh... nemed en eur ober e labour, digouezet gand ar perukenner terri ar vlevenn brisiuz... ha droug braz er pratik, eveljust.

— Sapre genaoueg! bremañ on disto! Ne vijen ket pell o kas ahanout e prosez.

Ar hillog nevez

War an hent braz, dirag porz an tiegez, eur yar a oa dizoursi o klask he boued pa zigouezas souden eur harr-tan, herr warnañ ken a zibar-daone... ha plu o nijal e-touez ar boultrenn.

Eüruzamant evid ar paour-kêz yar, n'oa ket bet lazet. Sevel a reas a-ruillou...

— Feiz, emezi, klevet em-boa lavared oa deuet eur hillog nevez d'an ti all; mad, evid mar deo hemañ eo, ne harpin ket outañ!

Ki ar hantreer

Eur paour-kêz dén, paour-ran, n'e-noa nemed e gi a leve : Medor.

Siwaz, eun dervez e rankas ivez poazad e gi evid leina.

Ar paour-kêz ki a oa treud-gagn, setu oa lonket toud en eur préd, ha c'hoaz an dén a rankas lipad piz an eskern.

P'edo o lipad anezo, e soñje truezuz en e gi hag e lavaras en eur ouela :

— Paour-kêz Medor! Na pegen kontant e vije bet o lipad an askorn-mañ... kemend-all e plije an eskern dezañ!

Bioh Jakou

Jakou a zo o tistrei 'z a foar Lezneven, leun e reor evel kustum... N'oa ket ledan a-walh an hent evitañ.

Mad, petra vo greet? Jakou zo chomet paotr-yaouank-koz. Setu ne ra droug nemed dezañ e-unan.

Gwasa 'zo, ar vloh nevezig prenet gantañ, a ranko da horo pa erruo er gêr. A-benn ar fin, ruill-diruill eh erruas.

Mond a reas en ti, tapa krog el letern, tapa krog er zailh ha yao er hraou.

Ar Ruzig oa rampet gand he zeziad lêz, o termal, defod beza dizammet evel just... Ha Jakou da buhad dindanni. Gweled mad a ree an téz hag ar peder bronn outañ, zoken a-wechou e wele eiz bronn hag eno oa an dalh, rag kaer e-noa poania da dapoud anezo a beb eil, e skoe atao e-biou. Gwech e tape garr ar vloh, gwech e tape he skouarn, gwech zoken e tape he lost ha beb an amzer memestra e tape eur vronn bennag. Med pa ziskroge diouti da glask goro, e chome boud adarre n'oar dén pegeid, hag ar paour-kêz Ruzig a gendalhe da dermal gwasoh eged eur vloh nevez-hal.

A-greiz-toud, o weled Jakou mezo-dall, ar vloh hag he-doa muih a skiant egetañ, en em lakeas da gaozeal :

— Arsa, Jakou, emezi, kenta tro ma tapi va

bronn, na ziskrog ket ken, en an' Doue, me a zañso da zikour ahanout!

Béz an olifant

Olifant ar sirk a zo maro gand ar gozni. Ema ar mevel oh ober eur pez toull d'hen douara hag en eur ober e labour e ouél hag e ouél gwasoh eged ma vije maro e dad.

Mestr ar sirk, o weled kement a gañv, a lavar dezañ :

— Ne ouien ket e-poa kement-se a joa ouz an olifant.

— Nann, n'em-boa ket a joa outañ; m'emaon o leñva eo ablamour ma rankan ober eun toull ken braz evid e zouara.

Kaz-troh an ostaliri

En eur eva e vanne en ostaliri, eun dén a zell dre ar prenest, hag e wel kaz rouz an ostiz oh ober sturiou droch.

Mond a ra d'ar réd en eun ti; kerkent e teu er-mêz; mond a ra en eun ti all; kerkent e teu er-mêz adarre; en eun ti all, hag er-mêz dioustu, hag e mod-se ti-ha-ti, beteg penn ar ru.

— Arsa, eme an dén d'an ostiz, petra 'hoari gand da gaz? Eet eo da zod pe betra?

— O! n'eo ket, a respontas an ostiz; er mintin-mañ eo bet trohet dezañ e beadra; setu ema o kas kelou d'e vignonezed ne yelo ket emberr da bardona ganto.

Al loa-goad er volennad lêz

Ifig Lagadeg a zo laouen, soñjit 'ta e-neus kavet labour e kêr da werza mekanikou da wriad. Setu, anad deoh, 'z eus lorch ennañ. Kontant eo ha koulskoude n'eo ket kontant a-walh. Eun draig a zo oh ober nehamant dezañ.

Ya, bremañ, gand e vicher nevez, e ranko chom aliëz da loja en diavêz hag Ifig siwaz n'e-neus ket kalz a fiziañs en e wreg! Fantig a zo eur penn-skañv hag Ifig 'n-eus aon e vije skañv he garr ivez... Kredi 'ra e vez gwazed all o weled anezi pa ne vez ket er gêr... 'Fin, n'eo ket sur a-walh, med kazimant... ha penaoz gouzoud ivez? Penaoz e rit-c'hwi, gwazed? Petra 'pije greet e plas Ifig?

Mad, selaouit petra 'reas on dén.

Setu petra ijinas goude beza torret e benn o klask.

A-raog mond kuit euz e di, e lakeas, dre guz, eur volennad lêz dindan ar gwele, just e-kreiz hag a-zioh ar volenn, speget ouz ar somier, eul loa-goad.

— Evel-se, emezañ, e ouezin ma vez bet daou o

loja er gwele.

Ya, ma vez va gwreg he-unan e-barz, he fouez ne vezo ket a-walh da lakaad al loa da ziskenn beteg al lêz. Med ma vezont daou er gwele, ar somier a wano dindan o fouez hag al loa a deuio da zouba el lêz. Da houde, pa deuin d'ar gêr, n'em-bezo nemed selled pe vo roud al lêz war al loa-goad pe ne vo ket, hag e vezo sklêr an traou.

Pa deuas d'ar gêr e yeas buan, anad deoh, da zelled dindan ar gwele, ha petra 'gavas?

Eur volennad amann!

Ar haz « Baba »

Chobig e-noa eur haz bihan, Baba e ano, hag a oa e zoue!

Eun dervez, keid ha ma oa Chobig er skol, friket Baba gand eun oto!

Penaoz lavared an dra-ze da Chobig emberr? a zoñje e vamm.

Ha red oa hen ober koulskoude.

Pa erruas ar paotrig euz ar skol, ar vamm a yeas goustadig dezañ :

— Selaou 'ta, Chobig, Baba a zo maro.

Chobig ne reas van ebed; kendalher a reas da zutal en eur hoari. Ar vamm ne gomprens netra!

Diouz an noz, pa deuas an tad d'ar gêr, e houlennas digand Chobig :

— Ahanta, va faotr, ne gavez ket re ziêz e vije

maro Baba?

— Petra? a youhas Chobig en eur ouela ken a zifronke.

— Perag emañ er stad-se a-greiz-toud? eme an tad. Bremaig da vamm he-deus lavaret ar memestra dit ha n'e-peus ket leñvet.

— Me am-boa klevet oa maro papa!

Eun tad-koz yah

— 'Peus ket a véz, tad-koz, d'an oad ho-peus, atao o redeg war-lerh ar merhed yaouank?

— Ya, gwir eo, redeg a ran war o lerh. Siwaz, pa vezan erruet harp outo, ne ouezan ket ken da ober petra e vezan deuet!

Alanig er skol

Eur wech Alanig, o tistrei euz ar skol, a lavar d'e dad :

— Me ne yin ket ken d'ar skol; ar mestr e-neus droug ouzin.

— Penaoz? eme an tad.

— 'Pad an deiz e vez o vrouda ahanon.

— Marteze ivez e vezez o c'hoari er hlas?

— Ne vezan ket; ne lavaran gêr ebed zoken.

— Mad, neuze e tleez fazia; da vestr-skol n'eo ket droug.

— Eo, droug eo ouzin-me; ne ouzon ket petra 'm-eus greet dezañ.

— Warhoaz e yelom on-daou d'e gaoud hag e vezo gwelet.

En dervez war-lerh, Alanig hag e dad a oa dirag ar mestr-skol.

— Va mab a glemm oh kasauz outañ.

— Me? Ne gomprenan ket.

— Ha neuze Alanig, gwir eo pe n'eo ket?

— Eo, gwir eo; 'pad an deiz e vez o klask ahanon.

— Selaouit hoh-unan, eme ar skolaer, me 'zo o vond da ober goulennou outañ evel ma ran bemdez...

— Ahanta, Alanig, emezañ gand eur vouez zous, lavar din pegement a ra daou ha daou?

— 'Glevez ket, papa, ema adarre o staga ganen.

Er skol gatekiz

Eur paotrig a houlenn digand an aotrou person:

— Gwir eo, Doue a zo partoud?

— Ya, va faotr, gwir eo.

— Em hao zokén?

— A-dra-zur.

— Tapet, Aotrou Person, du-mañ n'eus kao ebed.

Re zo re

Daou gamarad oa eet da ober eur bourmenadenn war eur moto.

Yen e oa an amzer, setu an hini oa azezet war an dorchenn a-dreñv a gavas gwelloh boutona e chupenn a-dreñv e gein, evid ma vije klosoh an a-raog da stourm ouz an avel.

Alé, yao! Hag herr!...

Greet ganto dég kilométrad bennag, e chom ar blenier a-zav da dapoud beb a vanne. Siwaz! e gamarad n'ema ket ken war an dorchenn a-dreñv! Kouezet eo a-dra-zur. Setu egile war e giz, buanna ma helle da glask e vignon.

A-benn eur pennad e wél eur bern tud bodet e bord an hent.

— O va Doue! Amañ e tlefe beza, gand ma n'eo ket lazet c'hoaz!

Goulenn a reas digand an dud :

— N'eo ket maro?

Hag e oa respontet dezañ:

— N'oa ket maro pa'z om erruet warnañ, bremañ eo, p'on-eus klasket trei e benn dezañ war an tu mad.

E ti ar pastecher ⁽¹⁾

— Va Doue, nag eo k er beva! Toud an traou a gr esk, eme Soaz da Vari.

— Toud an traou a gr esk, emezout? Ne lavarfes ket an dra-ze ma anavezfes Chamar du-ma n.

O tistrei euz ar Salette

Chob ha Soaz a oa o tistrei euz foar-an-neh gand ar charaba n. En em gavet e Toull-ar-Chistr, e-kichenn ar Salette, Soaz a houlennas digand Chob chom eur pennadig a-zav ma yafe da zizou-ra he horv.

— O! eme Chob kerkent d'e varh.

Ha Soaz d'ar r ed da buchad e kostez an hent.

D eg munut da houde n'edo ket deuet en-dro c'hoaz.

— Al  ! Petra 'hedez aze? eme Chob.

— Mardouen! me oar-me... atao 'teu, a respontas Soaz.

Marteze zok en ema eno atao rag eet oa da buchad e gwask ar mogeriou uhel a weler e Toull-ar-Chistr, o tivera abaoe kantvedou.

(1) pastecher : pastezer

Kla n v ar bouh

Kla n v eo ar bouh e ti tonton Laou ha galvet ar veteriner da ober war e dro rag ma teu d'ar paour-k ez loen mervel, e vezo rivinet tonton Laou.

— Dalhit aneza n en dommder, eme ar veteriner d'ar paotr-koz.

— Penaoz e rin va hont? Ama n n'eus ket "chauffage central", n'eus nemed em gwele e vije tommder.

— Ya, me oar, tonton Laou, med n'oh ket evid lakaad aneza n en ho kwele, ablamour d'ar c'hw ez.

— O! Leskit-ha n, en em ober a ranko!

Ar perhenn nevez

Kenta tra 'veze gwelet pa dostae ouzoh Alanig Abherve, eo eur mellad korn-butun o tivogedi gwasoh eged siminal an ivern, d'an eil, eur gre nichadenn a viziez, ha d'an trede an d en o heulia ar re-ma n war e sklakig, bihan e vent, bihan e lagad ha lemm e zell.

Setu aze kaerra kanfard a oe biskoaz bet dozvet e Bro-Leon. E droiou-kamm diniver o-doa talvezet deza n al lesano a Alanig, rag e gwirionez, Paolig oa e ano-badez.

Abaoe eur pennadig dija edo o veva en eun toull-kambr, a-zioh stal eur hemener, a oa eet

inouet o hedal anezañ da baea e dermen, tremenet n'oar dén pegeid. Pell 'zo eta oa o hedal tro war e laskar med ne ouie ket peseurt digarez servicha dezañ, evid e daoler er-mêz heb tapoud e zroug-rañs.

Na péd nozvez a dremenas evel-se ar hemener paour o klask difuilla e gudenn, o turiad beteg foñs e empenn, evid kaoud an tu da zifoara diouz eur seurt pratik!

A-barz ar fin e teuas eun tamm sklerijenn d'e spered ha, lorch ennañ, e yeas war eün da weled Alanig.

— Sell 'ta, Alanig, emezañ, daoust ha ne hellfes ket kaoud eur gambr en eun ti all?

— Chezuz! Perag 'ta, kemener?

— Feiz, re e vutunez, ha dre ma vezez e-pad an deiz o kreñchad diwar-goust da vutun, eo kroget ar zolier da vreina dindannout. Deuet on da houlen diganez klask da jañs larkoh.

Ar pabor a gomprenas buan ar gwir abeg a ree d'ar hemener e skuba er-mêz euz e di, hag a gavas gwelloc'h c'hoari e baotr-brao. Gand eun êr kabluz e respontas :

— Ya, gwir eo, me oar e vutunan re, med n'on ket evid miroud, kaer am-eus, ha n'ouzon ket muioh butuna heb kreñchad, setu petra 'fell dit? Red e vezo din en em glask neuze.

Eun dervez bennag da houde e skoas d'e dro war dor ar hemener.

— Ahanta, emezañ, ema renket an traou; kavet am-eus eur gambr all hag a vezo muioh diouz va

doare, peogwir ema en traoñ, war eul leurzi e leh ma hellin kreñchad forz pegement.

— Feiz, Alanig, n'out ket bet pell! Red eo lavared out eur pâotr dilu.

— 'Maon o paouez karga va zammig peadra 'barz ar harr a welez aze e-kreiz ar porz, ha deuet on da renta dit an alhwez. A-hend-all, kemener, n'e-peus ket bet da glemm diouzin, 'michañs.

— O nann, paneve e vezez 'pad an deiz o tivogedi hag o kreñchad war va zolier.

— Mad, neuze eh en em guitaom mignoned, neketa?

— Ha perag ne rafem ket? Ale, deus de gemer eur banne "partañs".

Pa oe lipet gantañ e werenn, Alanig a lavaras d'ar hemener, laouen-braz o veza deuet ken êz a-benn euz e daol :

— Me ivez, kemener, a zo bet atao kontant diouzit, zokén, evid diskouez dit va anaoudegez-vad, em-eus kavet dit eun all da lakaad em flas, ma karez.

— Hañ! Piou 'ta?

— Deus d'e weled; er gambr ema dija ouz da hedal.

— Fidamdoue, Alanig, te ne gollez ket da amzer. Mond a ran dioustu da ober anaoudegez gantañ.

Hag eñ, diwar-herr, d'ar zolier gand Alanig war e zeuliou.

Siwaz! Pa erruas er gambr, petra 'welas e-kreiz an abati? Eur pezh bern... respet deoh... fresk-beo,

o tivogedi kement ha korn butun Alanig.

— Setu ar perhenn nevez, kemener; sur on e plijo dit rag hemañ a fum med ne greñch ket.

Ar haz gwalhet

Eur baotrezig he-deus gwalhet he haz bihan hag hemañ a zo maro. He zad a hourdrouz anezi :

— Arsa, emezañ, arabad gwalhi ar hizier; ne houzañvont ket an dour; gweled a rez bremañ? Pa vezont gwalhet e varvont.

— N'eo ket p'am-eus gwalhet anezañ eo marvet, p'am-eus gwasket anezañ eo.

Tremen 'ra peb tra

Tri dad-koz a vez bemdez goude lein o heolia war eur bank dirag eur skol-veur.

Bemdez ivez e tremen dirazo eur skoliadez yaouank, kaer evel an deiz, en eur rodal 'pez ma hell... ha bemdez ivez, o weled eur seurt sapre nana, an tri goz a lavar asamblez :

— He...e...e... Ya!

Kontchou moh

— He, Maze! 'Peus ket klevet 'z eus erru er vro eur ouenn moh nevez, moh du euz Bro-China?

— O! Nevesoh a zo.

— Hañ?

— Ya, moh Kartajèn ⁽¹⁾ gand lostou eün ha n'int ket kordigellet.

— Ar seurt-se n'int ket nevez er vro.

— Penaoz?

— Ne anavezez ket ar ouenn moh-se? Moumoun spontuz.

O teski brezoneg

Eur zulvez, en e zarmon, eur beleg yaouank ha ne ouie ket kalz a vrezoneg a lavaras :

— Warhoaz : Fest. Dimeurz : Fest. Dimerher : Fest. Diziou : Fest, hag all.

— Feiz, aotrou kure, eme ar sakrist dezañ war-lerh an overenn, er zizun-mañ e vezo kalz a festou!

Ar beleg, hag a oa rog an tamm anezañ, a respontas :

— Selaou 'ta! n'eo ket te a raio al loaiou ⁽²⁾

(1) Kartajèn : eur gêr a Vro-Golombi; ar moh Kartajèn a oa eur ouenn vrudet a voh.

(2) red eo keñveria gand ar galleg evid kompren!

amañ, kredabl!

— O mad, ma vez kement-se a festou e vezo ezomm loaïou ivez, me zoñj.

Pariadeg Person Kerlouan

Person koz Kerlouan a oa eur farser; greet e-noa eur bariadeg gand e gure.

— Me 'bari, emezañ, disul e lavarín teir gwech *gisti* da verhed Kerlouan ha c'hoaz e vezint kontant.

Setu, pa oa deuet ar zul, e lavarás euz ar gadorzarmon kement-mañ :

— Merhed Kerlouan, kemerit skwér diwar Santez Maharid; ma vevit e-gisti e varvoh e-gisti hag e yeloh d'ar baradoz e-gisti.

Ra jomo yah da zaoulagad atao!

Eun dén a oa bet gwall-hloazet er brezel. Kollet gantañ e ziou skouarn, distaget nêr diouz e benn.

Kaset oa d'an ospital hag e gamaraded a veze bemdez o weled anezañ ha bemdez, pa veze o kuitaad ar gambr, e lavare :

— Kenavo ha yehed d'az taoulagad!

A-benn ar fin e houlennas digantañ :

— Arsa, perag e lavarez din bemdez : « *yehed*

d'az taoulagad »? Va daoulagad n'o-deus droug ebed.

— Eüruzamant! Soñj 'ta penaoz e rafes evid spega da lunedou pa n'e-peus skouarn ebed?

Kas anezi ganez

Eun dervez, Pèr a oa deuet da houlenn e verh da zimezi digand Chamari.

Ha Chamari da lavared « *ya* » dioustu, rag Pèr a oa eur fortun vad; ouspenn e ouie e plije kalz d'e verh.

Padal, homañ a stagas da ouela forz, pa yeas he zad da gas dezi ar helou.

— Perag e ouelez bremañ? Me gave din e plije Pèr dit!

— Ya, plijoud a ra din, med diêz e kavan dilezel va mamm.

— Ma n'eus nemed an dra-ze, eme Chamari, oh ober poan-spered dit, e hellez kas anezi ganez... me en em zacho propig va-unan.

Eul lonker

— Hag adarre mezo, Jakou? Perag eh evez kement-se? 'Peus ket a véz! Eun dén eveldout!

— Petra 'fell dit, eme Jakou. An douar a zo re izel evidon, an neñv a zo re uhel, n'eus nemed ar

hontouar hag a vije diouz va live.

Eur sapre dozverez

- 'Peus ket c'hoant e kontfen dit istor ar yar a zozve teir gwech bemdez ar memez vi?
- Penaoz e ree he hont?
- Lonka eur pennad lastik da genta.

Ar sakrist o sikour koves

Derhent sul Fask, an aotrou person a oa nehet o weled nag a dud oa deuet da goves... ouspenn eur hant!

— Feiz, a zoñje, me vezo amañ beteg hanternoz o selaou ar re-mañ o storlokad! Ha just ar garabassenn he-doa rostet eur hillog-raden evid koan, setu, anad deoh, ar person e-noa mall da vond d'e lipad.

Mad, emezañ, ar pezh 'm-eus da ober eo lavared d'ar sakrist mond er gador all da zikour ahanon.

— Ya, med ne ouezin ket penaoz ober, a respontas hemañ.

— Eo, eo, n'e-po nemed selaou da ober.

— Hag evid ar binijenn? Petra roin-me dezo?

— Me roio dit eur follenn baper a vo skrivet

warni an tarif, ma karez.

Hag ar sakrist er gador-goves.

An dud a gonte o fehejou, ar sakrist a zelle ouz an tarif, ha diouz ar pezh a veze kontet dezañ e roe teir bater, teir ave, eun dizenez, eur chapeled a-wechou.

E-touez ar beherien, eur gwaz a deuas da goves d'e dro.

— O! emezañ, me am-eus eur gwall behed war va houstiañs; n'ouzon ket penaoz hen anzaou ouzoh.

— Lavar 'tao, eme ar sakrist, kemer da herr ha dizah en eun taol.

— Mad, me a zo bet o kousked gand eur vaouez ha n'eo ket va hini.

— Gortoz, ma welan peseurt pinijenn rei dit.

Siwaz, war an tarif, ne oa ket merket ar pehed-se.

— Deport eun tammig, me 'rank mond da houlen digand ar person.

— Aotrou person, evid kousked gand eur vaouez, pegement a dlean rei?

— O! eme ar person, beteg-henn, me ro pemp kant lur.

Ar vragez he boutonou a-dreñv

Chob a zo anvet da zougen ar groaz aour deiz pardon Sant Paol.

— Red eo dit mond da lakaad ober eun abid nevez evid eun okazion evel-se, eme e wreg dezañ.

Setu Chob d'ar bourk da gomandi eun abid kaer, e gloan flour euz ar gwella.

Bet eo oh esêa teir gwech dija; mond a ra mad an traou, an abid a zo eun dudi ha Chob a zo 'vel eur paotr yaouank ganti. Deuet eo an dervez da vond d'he herhed.

— Gwisk anezi eur wech all c'hoaz, Chob, ma welan ha kempouez eo peb tra war he zro.

Ha Chob da wiska e abid evid an taol diweza e ti ar hemener.

— Biskoaz, emezañ, n'em-eus greet eul labour ken kempenn; teuzi 'ra da zillad warnout ha koulskoude emeon o paouez merzoud eur pikol fazi war ar vragez; soñj 'ta em-eus greet anezi da zigeri a-dreñv kein ha, siwaz, re ziwezad eo evid difazia hirio; digas anezi en-dro er zizun a zeu.

— Arabad dit ober bilou, kemener; êz 'maon e-barz; ne vez ket gwelet ar fazi ha, forz penaoz, me gustum atao trei va hein evid staotad.

Va pe On?

Marijan eo karabasenn ar presbital, eur pezh foug enni gand he harg, gwasoh eged ma vije dezi ar barrez a-béz, ne vez klevet nemed o lavared : *va fresbital, va iliz, va liorz*, hag all.

A-benn ar fin, an aotrou person a lavaras dezi :
— Arsa, Marijan, arabad deoh lavared evel-se « *va* » fresbital, « *va* » iliz, « *va* » oto; lavarit : *on* fresbital, *on* iliz, *on* liorz, ne vo ket diêsoh hag e vezo kalz gwelloh.

— Mad eo, aotrou person; lavared a rin « *on* » hiviziken.

— Ouspenn, Marijan, em-eus da lavared deoh e teuo tud da leina warhoaz, kuzulierien an iliz hag o merhed; setu e vezo red deoh ober friko d'o reseo.

— Bezit dineh, aotrou person, me ne vezan ket chalet oh ober boued mad d'an dud pa vez roet danvez din.

Ha gwir eo oa eur sapre keginerez; friko he-doa aozet ken e oa eur pezh lorh er person.

Ken e oa gwelet Marijan o tond da furchal e armeliou ar zal.

— Petra 'maoh o klask, Marijan? a houlennas ar person diganti.

— On kazez, aotrou person.

— Ar gazez n'ema ket amañ.

— O va doue! eme Marijan, gand ma n'eo ket eet da ober he hizier bihan e-barz on gwele!

Sutéréz en iliz

Lavared a ran deoh n'eus diaoul ebed ken evid ar vugale.

Em bro din-me, evid ar bloaz nevez, ar vugale o-deus bet suterezed; ar hiz vraz eo ganto tro du-mañ; setu ne vez klevet nemed : tut! tut! tut! e kement leh a zo; zokén ar ganfarted-se a gase o zutérézed en o godell, beteg en iliz.

En deiz all, oa kement a reuz ganto e-doug an overenn-bréd, ma yeas droug en aotrou person :

— Peoh a vezo! emezañ.

Lod a gendalhe memestra. A-benn ar fin, an aotrou person a youhas dezo nerz e gorzailenn :

— Er-mêz, kement hini e-neus eur zutéréz!

Ha toud ar wazed er-mêz, nemed Cheun Skouarneg hag a oa bouzar.

Neuze oa klevet Soaz, e wreg, o lavared dezañ :

— Kee er-mêz 'ta, Cheun, pe vo lavaret n'e-peus sutéréz ebéd.

Eur vamm-goz aveleg

Mamm-goz a zo ponner-gleo pell 'zo, med abaoe eun nebeudig eo gwaseet he stad... Ne glèv netra ken... hag hi da gaoud ar medisin.

— Arsa, aotrou medisin, me 'zo bouzar a-walh eur pennadig 'zo... Ne glevan ket zokén va zrouz pa vez an avel en izel ganen.

— Me 'zo o vond da rei louzou deoh, eme ar medisin.

— Hag e klevin gweloh?

— O! ne reoh ket, med diaveli kreñvoh.

An dour Lourdez

Warlene Chani an ti all he-doa gounezet eur billed da vond da Lourdez ha kement a foug a oa enni m'he-doa digaset d'he mignoned eur bern traou euz he felerinaj : medalennou, chapeledou, gwerhezved plastik ha me oar-me! Med dreist-oll oa deuet ganti eur pezh toukennad dour Lourdez... pouez he buhez!

— Eur weradennig da bep hini, eme Chani, ha grit sin ar groaz a-raog hen eva...

Evelato da Liza, he mignonez wella, e roas eur voutaillad leun.

— Del, Liza, emezi, bez kempenn war homañ, ha pa vezo tud klañv en da di, e kavi gras he haoud.

Ha Liza d'he gorren war stal uhella he fres.

— Rekouret on ganez, Chani, me lar dit, keid ha ma pado va dour Lourdez, ne vezo ket ezomm amañ nag euz medisined nag euz o apotikerez brein.

C'hwi oar n'eus ket par d'an dour santel-ze da barea ar hleñvedou.

Evid ar mare oa yah an dud e ti Liza, med pa erruas ar miziou du hag ar glaoeier, setu adarre ar remm o c'hoari las war ar paour-kêz Liza. Kaer he-doa lonka aspirin, seurt da ober, pa deuas da zoñj dezi euz an dour Lourdez. Mond a reas war-eün d'he fres d'e glask... Siwaz! Ar voutaill a oa goullo!

— Hopala! Lom Muzelleg, emezi d'he fried, petra 'peus greet gand dour ar voutaill-mañ?

— Feiz, lakeet anezañ em Ricard.

— Penaoz, sovaj! va dour Lourdez a zo eet toud en da gorv? Hag e-mesk ar Ricard c'hoaz? Hañ, bremañ e komprenan mad perag n'e-peus chati ⁽¹⁾ ebed ken gand da brostat!

Ar goarenn-veur

Chamar ha Mon a oa dimezet pemp bloaz a oa ha n'o-doa bugel ebed c'hoaz, ar pêz a ranne dezo o halon.

Eur mignon misioner hag a oa e permission, a lavaras dezo :

— En ho plas, me yafe da Lourdez; eno ar Werhez a ro grasou d'an neb a oar pedi; marteze e selaoufe ahanoh-c'hwi ivez.

— Ya 'vad, eme Chamar, mond a reom goude an eost.

Hag int da beherina pa erruas miz gwengolo.

Pedet o-doa euz o gwella ha lakeet eur mellad koarenn e-harz treid ar Werhez, a-raog kuitaad Lourdez... ken braz hag eur peul telefon.

Goude-ze, ar vuhez a gendalhas evel kent. Pep hini a stagas en-dro gand e labour ha... gand e zeve.

Ar misioner a zistroas ivez da vro ar re zu.

(1) chati : poan

Diwezatoh, tri pe bevar bloaz da houde, pa deuas adarre e permission, e yeas evel just da weled e vignoned

Pa erruas er porz, kenta welas, eo tri vihan war treuzou an nor o selled outañ o tigouezoud.

— Ahanta, emezañ, ho mamm a zo er gêr?

— N'ema ket, a respontas an hini gosa, eet eo d'an ospital da brena eur breur bihan deom.

— Ha tata, peleh ema?

— Tata 'zo eet da Lourdez da vouga ar goarenn.

Dirag kraouig Nedeleg

Eur vamm-goz a zo eet gand he mab-bihan da weled ar hraouig en iliz ha goude ar weladenn, ne oa fin ebed dezi da zibuna pateriou dirag an aoter vraz, ken e oa inouet-maro ar paotrig.

— Mamm-goz, deus 'ta, a lavare beb an amzer.

— Gortoz, va êlig, p'am-bezo echu va chapeled.

A-benn eur pennadig all :

— Mamm-goz, deus bremañ.

— Ya, va moumounig, eur pennadig all c'hoaz hag e yeom dioustu. Ne welez ket ar goulou ruz aze dirag an aoter? aze ema ar mabig bihan.

Hag ar paotr sioul, e-pad tri munut all, o selled ouz ar goulou ruz.

A-greiz-toud :

— Mamm-goz, pegeid e chomo ruz? Lavar 'ta, mamm-goz... pa vezo glaz e lohom neuze?

Eur penn-skañv

— Mamm, eme Katellig, en eur ouela... Me 'zo dougerez!

— O Rosenn! ⁽¹⁾ Ha gand piou out bet o ruilla da gorr? Gand peseurt lakepod?

— Ne oa ket eul lakepod, mamm, med eur medisn, rag gwelet am-eus war e slip e oa merket "Docteur Razurel".

Chamar er harr-kañv

En dervez-se, Chamar e-noa lakeet en e benn mond da werza e vloh da foar Lezneven. Deuet e oa poent d'hen ober.

— Mad, eme Soaz dezañ, laka da zillad prop ha diwall e pe stad e tistroi d'ar gêr emberr.

Setu Chamar d'ar foar. Dizale eo gwerzet ar Ruzig ha gwerzet mad ouspenn.

En em gavet on dén gand daou gamalad :

— Eur banne 'vo, paotred? Me 'm-eus gwerzet va bioh... Ale, deuit!

(1) Rosenn : tamm gagn

Ha yao d'an ostaliri dosta, da eun all da houde, da eun all c'hoaz, ha da eun all, ha da eun all ha da eun all...

Seul-vui ma event, seul-vui e teue sehed dezo. Setu, anad deoh, a-benn an noz, an tri ganfard n'oant ket brao da weled.

Siwaz, red oa mond d'ar gêr!

Chamar oa an hini ar muia tourtet; n'oa ket gouest da lavared "bara".

— Petra vo greet diouz hemañ? eme an daou all.

— Ar pezh a zo sur, ne hell ket mond dirag Soaz evel-se.

— Petra da ober neuze?

— Sell 'ta! amañ ema ar harr-kañv; taolom anezañ e-barz da hedall ar mintin; warhoaz, pa vezo divorfilet, e kerzo d'ar gêr 'giz ma karo.

Setu lakeet Chamar er harr-kañv, sachet braoig ar pallenn du warnañ hag an daou all en hent gwella ma hellent.

Chamar a gouskas evel eur broh... Siwaz, en dervez war-lerh, oa eun anteramant er barrez hag ar sakrist a deuas abred da sternia e varh ouz ar harr-kañv.

— Ale, hey! Pichar!

D'ar poent-se, an hentchou ne oant ket flourig evel bremañ. Chamar, hejet-dihejet, a zihunas dizale, a zifoupas euz dindan e ballenn, ha pa welas edo 'barz ar harr-kañv, e lezas eur youhadenn ken skiltruz ma pennfollas ar paour-kêz Pichar ha ma yeas d'an daoulamm, kaer e-noa ar sakrist dalher warnañ.

Eur horn-tro pe zaou, ha Chamar strinket e foz-al-levenn ⁽¹⁾, karget a zour war-lerh ar glaoeier diweza. N'ouzon ket pe an dour yen pe e spontadenn a zigasas dezañ e venoziou en-dro.

— Gast! emezañ, en eur ober eur zell ouz e zillad. Petra a lavarao Soaz?

Ne oa nemed fank outañ euz an eil penn d'egile.

En aon da veza gwelet kaillaret gand eur hristen bennag, e yeas d'ar gêr treuz ar parkeier. A-benn an noz eh erruas en e gêr. Soaz a oa e toull an nor, eur fas dir outi hag ar vaz-yod en he dorn.

— Euz a beleh e teuez, lakepod? Gand ar véz! Ha peleh ema arhant ar Ruzig?

— En an' Doue, Soaz, bez sioul, ha selaou ahanon. Me a zo bet taget gand an ankou... O! Soazig kêz! me gave din n'em-bije ket gwelet ahanout ken! Anad dit, hennez a zo eun tamm mad kreñvoh egedon-me... Kaer em-eus bet stourm outañ, on bet taolet er harr... Eüruzamant c'hoaz, dre va youhadennou on deuet a-benn da sponta dezañ e loen hag en eur horn-tro on strinket ermêz, war va fenn er vouillenn. N'ouzon ket pegeid on chomet badouellet... P'am-eus gellet sacha va skasou ganen, on deuet d'ar gêr treuz al lanneier, kitez da veza gwelet gand an amezeien. Ha setu da bried, Soaz, gléb-teil hag oh heja gand ar riou, med treh d'an Ankou.

(1) foz al levenn : ar foz a-héd an hent; marteze "foz ar vevenn".

— Deus buan e-kichenn an tan, Chamar baour. Me 'zo 'vond da rei dit eur banne sonn da zigas ahanout war da du.

An istor ne lavar ket petra oa deuet d'ar gêr euz arhant ar Ruzig...

Paour-kêz baot!

Echu e goñje gand Ifig ha lidet evel m'eo red, tri derveziad boz heb distaga da lavared eo : eun tortad maout!

A-benn ar fin e soñjas memestra distrei d'ar gêr. Setu yao da dapoud an treñ.

E-doug ar veaj e-noa bet amzer da ziskenn nousped gwerennad c'hoaz ken e oa boud a-walh oh erruoud e Kastell-Paol.

Amañ oa foar-yén o vond en-dro ken a foultre. Mad ar jeu, eme Ifig. Beh dei!

Da genta e yeas da zelled ouz paotred o tenna gand eur garabinenn.

— Me zo gouest da ober kemend-all. Digas unan din-me ivez.

N'ouzon ket penaoz e reas e gont, med gounezet gantañ ar priz kenta : eur baot!

Hag Ifig larkoh da henaouegi ouz ar staliou all.

Eun eur goude, e teuas en-dro da hoari gand ar harabinennou adarre hag adarre e tistagas ar priz kenta, nemed en taol-mañ e oa roet dezañ eur bapaig.

— O! petra rin-me gand eur bapaig? Ne hellfen

ket kaoud eur "haskrout" evel bremaig?

Eur roue droug

Er mare-ze, roue ar Baganiz a oa droug evel eur bleiz. Toud ar Vro-Bagan oa dezañ evel just ha pa errue gouél Mikêl, e veze enkrez e-touez e dud rag arabad e vije dezo chom da vankoud eur gwenneg d'ar pabor. Neuze, koulz ha bremañ, n'oa ket êz beva ha ne veze ket atao kavet fréd d'an trevajou treud a zave er vro.

Er bloavez-se oa bet diêsoh c'hoaz eged kustum, hag ar roue 'n-oa aon da veza paeet gand legumach. Setu 'n-oa greet embann : an hini a zigasfe diouto e vijent plantet dezañ en e benn a-dreñv.

Pa erruas an dervez, Fañch ar Pagan n'e-noa ket eul liard toull en e di.

— Petra da ober? emezañ. Ma ne yan ket da bae e vezin kastizet, taolet en toull-bah marteze. En despet ma'z eus divenn, gwelloh din mond memestra gand eur harrad karotez.

Pa en em gavas e porz ar maner, ar mevel a lavaras dezañ :

— O! maleüruz! Ne ouzout ket 'ta eo divennet digas trevajou?

— Eo, sur. Klevet am-eus med n'em-eus seurt all.

— Klevet e-peus ivez petra hoarvezo ganez?

— Ya, siwaz!

— Mad, deus amañ e-kreiz ar porz; diskenn da vragez ha puch ma vo plantet da garotez dit el leh ma ouzout.

Fañch a zentas kabluz hag ar mevel a reas e labour digernez.

Tra ma tremene ar harotez e ti a-dreñv ar Pagan, hemañ a hoarze, a hoarze ken e oa prest da zianala...

— Arsa, a houlennas ar mevel, perag e c'hoarvez? 'Peus ket a boan 'ta?

— O eo! poan am-eus, med ne hellan ket mired da hoarzin pa zoñjan eo erru va amezog gand eur harrad beterabez!

Priz ar billed treñ

Tomm an amzer; ar zul a zo.

— Deom toud d'an aod, eme Chob d'e familh. Evid se eo dao kemer an treñ.

— Péd billed ho-po? a houlenn paotr ar billeji, pa erruont er gar.

— Feiz! ni 'zo amañ va gwreg ha me, ar mous bihan ha va mamm-gaer.

— A ra pèvar, a respontas egile.

— Alato, eme an tad, ne vo ket red paea keid evid ar mous-mañ hag evid ar re vraz? Hemañ n'eo ket eiz vloaz c'hoaz!

Neuze paotr ar billeji a reas eur zell dreist e

lunedou hag a lavaras :

— Gwir e tlefe beza, eur bragou berr a zo gantañ; setu ne baeo nemed hanter briz.

— Hopala! ma vez greet diouz hirder ar bragou, mamm-gaer ne ranko ket paea peogwir ne vez tamm bragou ebed ganti.

Bernia pe leda

O tistrei 'z ar foar, Chamari, diwar re govad, a rankas lammed er park, poent dezañ diskenn e vragou.

Erruet en tu all d'ar hleuz, e welas eun all oh ober eveltañ.

Pa en em gaver asamblez, tro du-mañ ema ar hiz da lavared eur gér bennag an eil d'egile :

— Hañ! o vernia, eme Chamari.

— Nann, o leda, 'respontas egile.

Eun telefon da gaozeal gand ar re varo

Eur wech e oa daou bried ha ne oant ket gouest d'en em gleved. Atao e veze cheu etrezo.

Chob a rohe, Frazi a zinkane ha beh bemdez, ken e teuas an Aotrou Doue da skuiza ganto ha ma soñjas o dispartia.

Del! Setu maro Chob.

Hañ! Diwar neuze avad oe klevet eur zon all :

— O va Doue! Na me 'zo maleüruz!... Petra deuin da veza heb Chob, Doue e bardono... O! na me 'gav diêz! Mervel a rin ivez, sur eo!

Ha patati ha patata! Ken e oa avinet penn an dud o selaou anezi. A-benn ar fin, Laouig he fillor, eur hanfard ma oa unan, a lavaras dezi :

— Arsa, Morraine, peogwir ho-peus kement-se a gañv da donton Chob, perag ne lakit ket eun telefon ispisial da gaozeal gantañ?

— Eun telefon da gaozeal gand ar re varo? Te 'maout ket mad!

— Eo, eo, Morraine, bremañ 'vez kavet diouto.

— Ha pegement e koustfe din?

— Hanter-kant mil lur, tra kén.

— Hag e hellfen kaozeal gand tonton Chob, Doue e bardono?

— Feiz ya! Kement ha ma karoh!

— Del, neuze, hanter-kant mil lur dit ha kerz dioustu da brena ar pezh zo red.

Ha Laouig d'an daoulamm e kêr gand yalhad Morraine ha... bole d'ar peziou melen.

A-raog an noz e teuas en-dro laouen evel ar spered santel.

— Mad eo, Morraine, ema renket an traou, eul linenn nevez a zo speget deoh war ho telefon. Setu bremañ e helloh kaozeal gand tonton Chob bemdez da 9 eur noz.

— Emberr e rin, sur eo.

— N'ho-pezo nemed ober an niverenn a roan deoh amañ.

Pa zonas 9 eur edo Frazi ouz an telefon o krena evel eur bern deliou hag he fillor war-héd er penn all, anad deoh.

- Allo, Chob, aze 'maout?
- Ya.
- Neuze 'maout er baradoz, Chob?
- Gast! 'maon ket!
- O, Chob gêz, neuze 'maout er purgator?
- 'Maon ket ivez, nondedie!
- O, Chob baour, neuze 'maout en ivern?
- Ya, siwaz!
- Hag e-peus poan, va Chobig-me?
- Muioh am-boa ganez-te pa oan war an douar.

Eur wiz speredeg

Lomm e-neus eur wiz euz ar re vraoa en e graou.

Deuet eo Fañch da weled anezañ.

— Feiz, te 'peus eur wiz vrao! Honnez a dle dofi ⁽¹⁾ moh bihan mad dit.

— Ne ra ket da.

— Kaset 'peus anezi d'ar par?

— 'M-eus ket, da.

— Mad, red eo dit kas anezi.

— Da beleh?

— E milin Kernabad 'z eus eur par disheñvel.

(1) dofi : dozvi.

- Hag em-bezo moh bihan?
- Evel just!
- Ha pegement e kousto?
- Noused priz a zo : kant lur, hanter-kant lur, tregont lur, diouz ma paei e-po...
En dervez war-lerh, lakeet ar wiz war ar garrigell, ha yao da Gernabad.
- Pegementad? eme ar miliner.
- Tregont luriad a vezo a-walh, a respontas Lomm, tost spontuz d'e vouneiz.
- Pa oe echu an abadenn, sammet ar wiz er garrigell adarre evid distrei d'ar gêr.
- Lorh a oa e Lomm, warhoaz, a zoñje, em-bezo moh bihan du-mañ.
- Siwaz, pa zavas en deiz war-lerh, ne oa ket bet a voh bihan!
- Kredabl n'em-eus ket lakeet priz a-walh. Deom en-dro.
- Setu ar wiz er garrigell eur wech all, ha Lomm el limonou d'he has da Gernabad.
- Lakit evid hanter-kant lur, mar plij, 'm-eus ket bet a voh bihan.
- 'Vez ket beb tro, a lavaras ar miliner.
- Distroet d'he hraou, Lomm a reas brao d'e wiz, kolo fresk ha boued tomm.
- En dervez war-lerh, pemoh bihan ebed atao!
Diêz eo penn Lomm, nag a arhant kollet!
- Mad, ne blegin ket; ma karfen ivez beza kemeret evid kant lur dioustu, anad eo n'on ket boazet diouz ar vicher c'hoaz.
- Dizale eme ar wiz adarre er garrigell war hent

Kernabad.

— 'M-eus ket bet a jañs ganti; lakit kant luriad ha peoh da houde.

Greet an traou hervez e houlennoù ha digouezet er gêr, e stagas da voumouna ar wiz : kolo frésk, boued tomm, pallennoù hag an tele war F.R.3 'pad an noz. Lomm ne gouskas tamm; abred oa er hraou, a-veh ma oa deiz... Pemoh bihan ebed war-wél hag allaz! gwiz ebed kennebeud!

A-benn ar fin e kavas anezi pignet dija er garrigell, o hedal Lomm da bunta anezi beteg Kernabad!

— Pennad gast! eme Lomm dezi.

Roudou an daoulin

'Barz an treñ, eur paotr yaouank lent a zo azezet dirag eur plah yaouank vrag, c'hoant dezañ toulla kaoz ganti, med ne oar ket penaoz en em gemered. Selled a ree outi ar pezh ma helle, ha gér ebed ne deue er-mêz euz e henou. A-benn ar fin :

— Eur zae vrag 'zo ganez!

— Hañ ya, eme ar plah yaouank divergont; mad, homañ 'zo greet gand eur roched koz d'am zad.

— O! digarez ahanon; red e vije bet din kompren kement-se rag gwelet e vez atao roudou e zaoulin.

Ruz pe zu

Chani a zo oh ober he zalarou; ar beleg a zo o paouez noui anezi ha Viktor, he fried, a zo teñval e benn 'tal ar gwele.

— Eüruz om bet asamblez, emezañ souden, nemed eun dra a gendalh da waska va halon bepred; lavar din bremañ, Chani, perag e-touez or bugale, n'eus nemed an diweza a vije du e vleio; hennez n'eo ket din-me, kea? peogwir ar pemp all a zo brun evel an tan...

— Neuze e hellez beza dizammet, Viktor, rag hennez eo a zo dit hag ar pemp all n'int ket!

O ruza e Pariz

Pèr ha Soaz a zo eet da Bariz ha Soaz a felle dezi, dreist-oll, gweled toud ar staliou dillad brao, ken e oa eet skuiz Pèr o haloupad war he lerh.

— Kee da-unan, a lavare dezi.

— O! ket! deus ganen, me 'm-eus aon da veza kollet.

'Benn an trede dervez, gwelet ganto toud an traou, Pèr a oa prést da goueza en e boull gand ar skuizder; setu e tivizas krenn chom a-zav :

— Selaou 'ta, Soaz, me 'm-eus poan em zreid, lakeet ganen va boutou eured da zond da Bariz ha bremañ eo kignet va bizied ganto. Kerz da-unan

ma fell dit, evidon e chomin amañ, war ar bank-mañ, da hedal ahanout.

— Mad, evid me 'zo o vond; dèh em-boa gwelet eur vantell "fourur" hag hirio e yan da weled ha mond a ra diouzin.

— Ar vantell-ze a oa greet gand krohenn lapined bet ar mixomatoz dezo, n'e-poa ket merzet oa briket toud?

— N'eus forz, plijoud a ree din ha mond a ran.

N'eus ket muioh penneg eged eur vaouez p'he-devez c'hoant kaoud dillad nevez.

Eet Soaz da ruza e strêjou Pariz, Pèr ne jomas ket a-bell e-unan war e vank... Setu eur plah yaouank chik, berr spontuz he lostenn, o tond da azeza en e geñver; n'oa ket gouez anezi; klask kaozeal a ree :

— Alors, qu'est-ce que tu fais, toi?

— Me, eme Pèr, me 'zo peizant, ha te?

— Moi, je fais le trottoir, emezi.

— Petra? Ober "trottoiriou"? Na pegen digernez e vezer ouz merhed Pariz memestra. Ar merhed a zu-mañ ne vijent morse lakeet da ober eul labour ken ponner; biskoaz n'em-befe kredet kemend-all.

Ar plah yaouank a oa atao war ar bank e-kichenn Pèr pa erruas Soaz en-dro gand he mantell nevez.

— Petra 'ra ar vrag-mañ en da gichenn amañ? a houlennas rust digand he gwaz.

— Bez "poli" outi, Soaz; homañ a zo skuizmaro hag eo chomet da ehana eur pennad war ar

bank eveldon; soñj 'ta, ar gêzig a zo o labourad er "Ponts-et-Chaussées".

— Hañ?

— Ya, Soaz, lavaret he-deus din emahi oh ober "le trottoir".

Bazizien a zo tud seven

Ema ,an aotrou person oh ober e gest goude an eost, e Baz.

An dud a oa gand o fréd pa erruas e Keroh; yod-kerh saouruz e-kreiz an daol, amann rouzet ingalet brao war-horre. Pep hini a gustume ober, diouz e du, eun toullig er yod, evid mired eun tammig lipig da zouba.

Mestr an ti a ginnigas d'an aotrou person chom da breja ganto ha kercent ar vamm-goz a lavaras :

— Soubig e va zoullig-me, aotrou person, toullig ar vugale 'zo louz.

Na pebez tud seven!

Ki ar Botorelled

— Ahanta! Botorell, eme Soaz d'he fried hanter-gousket war e vank e korn an oaled, gweloh 'rafes mond d'az kwele, n'eo ket chom aze eo da zevi da wad ouz an tan.

— Hañ? 'respontas Champi Botorell.

— Mond d'az kwele, 'lavarán, méz a dlefes kaoud o rohal evel ma rez!

— Me, rohal? Te 'rohfe ivez m'az-pije ar pez am-eus.

— M'am-bije ar pez az-peus, her gouzañvfen heb termal; estreged an dra-ze am-eus gwelet kredabl. Feiz! Daoust hag ar merhed n'int ket deuet war an tamm douar-mañ evid gouzañv? Deoh-c'hwi ar blijadur, neketa, gwazed? Ha deom-ni ar beh da houde ha c'hoaz, c'hwi eo a ranko beza truezet ha moumounet, evel-se 'ma ho karakter...

— Ale, gra ar pez a lavarán dit : kee da gousked ha léz ahanon e peoh; inouet on ganez... N'eus ket a zroug ennon c'hoaz, med prést e vezo ha ne dalv ket ar boan.

— Daoust ha serret e-peus dor ar porz?

— 'Maon o vond.

— Ya, ya, oulan ⁽¹⁾, bremaig e hellez mond p'eo tehet Medor, ema eet gand ar foultr adarre! Biskoaz em buhez n'em-eus gwelet eur gwaz ken galouper hag ar hi-ze!...

— Medor!

— Galv atao, hennez 'ra foutre-kaer, sur... 'Maig e tapo diganen-me, sell... Medor! Lustrugenn! Dond a reoh amañ dioustu pe me 'zo 'vond deoh! Hañ! aze 'maoh! Dond amañ pa lavarán... Gweled 'ran ahanoh, kit 'tao; aze vezer kablu, hañ? pa vez dizentet.

(1) oulan: labaskenn

Petra? Mond a rit war ho kiz? Deuit en-dro, bern laou! Ale, deuit amañ bremañ, me 'm-eus ezomm da gaozeal ganeoh... Ne fell ket deoh?... Hañ, erru oh diwar eun nebeud! Tost eo bet d'ho lèr! Daoust ha c'hoaz e teho? Penaoz? Ne glevan ket... N'eo ket lipadennou eo a houlenann, med *Furnez*, klevet eo? Daoust ha c'hoaz e reoh? Respontit dioustu. Hañ? ne fell ket deoh respont kennebeud? Gwelet e vezo, delit, eur fasad atao da hedál ha puchit aze war ho reor, mar plij, da va zelaou eur pennad.

E-giz-se, 'maoh o tond euz a bardona adarre? o! n'it ket da nah, mab-ar-hast louz, rag anad eo warnoh : diskempenn ar vlevenn, reuget ar skouarn hag izel al lost evel just hag ano 'bed euz ar gêr, nemed naon a vefe?... Ha pa zoñjan euz a di biou 'maoh o tond! Eo, eo, eo, euz kostez ar bourk oah erru.

Honnez eo neuze? Mirza eo a blij deoh evel-se? Eur pez kaer ho-peus dibabet! Eun druillenn echu, eur glaskerez he boued hag eul laz-naon! Ya, setu aze toud petra eo hoh "hini goz". Hag ententit mad ganen-me, genaoueg ma'z oh, n'ho-peus ket ezomm da ober kement-se a dermaji evid kiez an ti-butun, eun ti darempredet fall war ar marhad! Eun ti el leh ma ne lakafe morse ho mestr e dreid!

Frésk oh da weled, c'hwi, ki ar Botorell, oh en em arosti ⁽¹⁾ gand petra? Ma n'eo ket eun druez!

(1) arosti: darempredi

O! Santez Anna Wened! Piou en-divije lavaret
din-me em-bije tapet kerentiach diwar traou ken
dister! Kit da zizon diwar an dra-ze!

Med gwir eo :

"Goude ma vefer du evel ar mouar

Gwenn-kann e vezer atao evid an neb ho kar".

Zokén, anez da ze, me kennebeud ne vefen
biskoaz dimezet d'ar Botorell!

Penaos gouzoud?

En ospital ar re zod, Loeiz 'zo pignet war ar
voger hag a halv Sisig e vigon.

— Deus 'ta buan, Sisig, da weled; amañ 'z eus
tud e noaz-birbill o pourmen.

— Petra int, Loeiz, gwazed pe merhed?

— Daoust ha me oar, n'int ket gwisket!

E Bro-Spagn

Ema Lan o vakañsi e Bro-Spagn, deuet dezañ ar
zorhenn da weled tirvi o redeg. Bemdez e vez o
selled outo ha plijadur d'ar paotr Lan, me lar
deoh.

D'ar zul e yeas da zebri en eun ostaliri. Digaset
dezañ roll ar meuziou, siwaz ne ouie ket lenn
spagnoleg; setu e oa tapet berr. En eur zelled
en-dro dezañ e welas eun aotrou gand eur pladad

pure dirazañ ha war ar pure e oa boulou kig ha
lipig forz pegement.

An dra-ze a dle beza mad, a zoñje Lan.

— Digaset din ar memez tra, mar plij, a houlen-
nas digand an ostiz.

— Dipituz eo, ne jom ket ken, med warhoaz e
vo adarre; deuit warhoaz hag e vezo dalhet ho
préd deoh, oa respontet dezañ.

En dervez war-lerh edo abréd Lan ouz taol ha
dioustu oa digaset dezañ eur foultrenn pladad
pure, boulou kig ha lipig war-horre. Pa oa sunet
gantañ an tamm diweza, e teuas an ostiz da
houlenn digantañ ha kontant oa ha daoust ha leun
oa e gov?

— Mad oa, mad-tre zokén, med kredi ran oa
difonn ar hig hirio; egile 'm-oa gwelet dèh a
zeblante beza bet servichet fonnusoh.

— Petra fell deoh, aotrou, n'eo ket bemdez e
vez lazet an taro!

Diêz spontuz

— Petra eo an diêsa da ober er vuhez?

— Staga eur bramm ouz eur wezenn.

Eun azenn prisiuz

E Bro-Gorsika eun azenn e-neus distaget eur mell ruadenn gand mamm-gaer eur peizant ha lazet-mik ar paour-kêz maouez.

Deiz an anteramant oa eur mor a dud en iliz-parrez. War-lerh an ofis, ar beleg a deuas da gaoud ar peizant hag a lavaraz dezañ :

— Gweled kement-mañ a dud en obidou a dle frealzi ahanoh, va dén mad; eüruz an hini e-neus eur seurt maread mignoned.

— Arabad deoh fazia, aotrou kure, n'int ket deuet evid frealzi ahanon, med evid klask prena va azenn.

Eur remed mad

P'ho-pezo poan dent, lakit eur banne dour yén en ho kenou, azezit war an trebez gand tan brao dindan; pa vervo an dour en ho kenou, e vezoh pare evid atao.

E baradoz an douar

Eva, droug braz enni, a lavar da Adam o tistrei d'ar gêr :

— Ahanta, lakepod! Te 'peus êr laouen, gand

piou out bet o ruilla da gorv?

— Arsa! Eva, sodenn ma'z out, gouzoud mad a rez n'eus nemed ni on-daou e baradoz an douar.

Eva a jom nehet ha disfiziuz. Kerkent ma ma'z eo kousket Adam, e stag da gonta e gostennou.

Par pe barez?

Pa yeer da brena eur peroked, ne vez ket êz gouzoud pe vez eur par pe eur barez.

Setu amañ an doare resiz da houzoud :

Lakit anezo en eur yenéréz ha gortozit eur pennadig. An hini kenta a glevoh o youhal :

— « Amañ 'maint o skorni ouzin!

Hennez eo ar par.

Stajidi difin

Eur pennad 'zo eo deuet ar hiz da baotred yaouank kêr da ober stajou war ar mêz evid deski anaoud eul leue diouz eur havrig.

Evel-se, e ti Yann-Loeiz a Geruhel oa deuet daou en hañv dremenet. Daou imobil, daou gollboud n'oant mad nemed ouz taol; setu 'veze sinkan e Nastazi evel just.

Eun dervez, Yann-Loeiz a zivizas kas an daou lakepod beteg Toullig-ar-Raned da gas ar vioh d'ar hole.

— D'ober an dra-ze, emichañs, e vezint mad, a zoñje ar peizant.

Da 9 eur oant e penn an hent, daou gilometrad dezo da ober da vond beteg Toullig-ar-Raned. Da greisteiz n'edont ket distro c'hoaz!

— Peleh ar foultr eo chomet ar re-ze? a skanbenne Yann-Loeiz.

Da deir eur, dén ebéd 'tao...

En e imor, ar mestr a lammas war e velo 'vid mond da glask e vloh.

Pa erruas en tu all d'ar Pontig, e welas o tond davetañ an daou Barizian hag etrezo, enervet oll, ar vloh he daoulagad er-mêz euz he fenn.

— Perag emaoñ ken, diwezd-mañ o tistrei? N'ho-peus ket kavet an tiegez 'ta? a houlennas Yann-Loeiz digand ar baotred, tolpez ⁽¹⁾ warno beteg o diskouarn.

— O! eo, kavet on-eus an tiegez, med na pebez abadenn p'on-eus klasket lakaad homañ war greiz he hein!

Evid piou voti?

Yannig an Touz n'e-noa nemed e ziu vloh da oll leve. Anad deoh n'edo ket an aour gantañ war ar raden.

Ganet oa paour ha paour e chomfe 'vid doare. Alato, pa erruas mare an eleksionou, e teuas eun

(1) tolpez : kaoh saout

tammig fiziañs dezañ o klevet ar promesaou kaer a veze greet a beb tu gand ar pennou braz.

Med penaoz ober e zibab pa n'oa ket maout war ar politik?

Seiz listenn a oa da joaz ha toud oa marvaillou brao gand o ferhenn; diouz o hleved oant gwelloc'h an eil eged egile.

— Mad, eme Yannig, gwella 'm-eus da ober eo mond d'o haoud ha goulenn diganto penaoz e vezo warhoaz va flanedenn ma teu dezo mond e-barz.

Hag eñ en hent gand e ziu vloh.

Da genta e yeas da di ar socialist.

— Ahanta, aotrou, setu amañ va oll feadra; deuet on da houlenn diganeoh penaoz e vezo kont evidon warhoaz ma yeoh-c'hwil e-barz?

— Netra da ober nemed rei eur vloh d'hoh amezeg tosta.

— O! gast!

Ha Yannig da di ar homunist da ober outañ ar memez goulenn. Hemañ 'respontas :

— Ma ya va hostezenn-me e-barz, ar gouarnamant a gemero an diou vloh hag a roio dit eur banne lêz.

— Hañ! eme Yannig.

Mond a reas da di ar fachist :

— Ar gouarnamant a gemero an diou vloh hag a werzo al lêz, oa respontet dezañ.

— Ya, me blanto ganez, kanfard!

Goude e yeas da di ar hapitalist.

— Ar gouarnamant a werzo eur vloh hag a breno eun taro.

Gwelet e vo, a zoñje Yannig.

War-lerh e yeas da di eun nazi :

— Ar gouarnamant a gemero an diou vloh hag an dén a vezo fuzuliet.

— O! pennad!

Kement hag ober an dro, e yeas da di ar rasist :

— Petra? Diou vloh e-peus. Unan wenn hag unan zu. Mad. Ar gouarnamant a lazo dioustu an hini zu.

Evid echui e yeas da di an teknokrat :

— Eu!... ar gouarnamant a gemero unan, a horoio ebén, hag a stlapo al lêz er stèr en aon na vije re dioutañ.

War-lerh e droiad, Yannig a oa atao ken nehet, hag an istor ne lavar ket pe oa bet o voti da houde zokén.

O teski galleg er skol

Ar mestr-skol a zo o rei eur gentel halleg d'e skolidi, gwelloh eun tamm war ar brezoneg.

— *Un oiseau et un oiseau, emezañ, ça fait combien?*

— *Deux "noiseau", 'respontas Feñchig.*

— *Non, on dit deuz "zoiseaux... deux oiseaux et deux oiseaux, ça fait combien?*

— *Quatre zoizeau.*

— *Non, quatre toiseaux... quatre oiseaux et un oiseau, ça fait combien?*

— *Cinq toiseau.*

— *Non, on dit cinq koiseaux; et maintenant, cinq oiseaux et quatre oiseaux, ça fait?*

— *Neuf koiseau.*

— *Non, Feñchig, tu es nul, on dit neu voiseaux.*

— Va reor evid al laboused bihan.

E toull dor ar baradoz

— Piou oh-c'hwi? eme Sant Pèr gand e vouez rog.

— Me veze greet Champi vraz ahanon; va gwreg 'zo beo atao.

— Dimezet oah, mad-tre; deuit e-barz, merzer.

War-lerh Champi, ca Pèr al Leue o hedal e dro.

— Ha c'hwi, piou oh?, a houlenas Sant Pèr digantañ.

— Me 'zo fillor deoh, hag ouspenn on bet dimezet teir gwech, a lavaras Pèr al Leue, o soñjal oa, gand an dra-ze, surroh eged egile da vond er baradoz.

— Er-mêz! a yudas Sant Pèr, amañ e vez digemeret ar verzerien, med nompaz ar henaoueien!

Ar rectum

Chamar a zo gand ar boan gov abaoe tri dervez.

— Kee da gaoud ar medisin, eme dezañ e bried.

— Red e vezo din 'vid doare.

Ha Chamar d'ar bourk da gaoud an aotrou Fave, ar medisin braz.

— N'eo ket kalz a dra, a lavaras hemañ goude eur zellig ouz kov Chamar; n'ho-pezo nemed lakaad supozitoariou.

— Hañ? Petra?

— Ya, lakit anezo e-barz ho rectum.

Pa erruas Chamar er gêr, e houlennas digand Rozali :

— 'Peus ket eur rectum bennag tro aze?

— Te oar ervad, me ne zalhan ket an traou koz; kee da houlenn digand an amezegez; honnez ne daol netra ebéd diwar he zro.

Chamar a yeas dioustu.

— E! Alin, n'hellfes ket presta da rectum din?

— Petra, Chamar? Oh ober goap emaut diouzin?

Ha stlapet an nor ouz e fri dezañ.

Distrei a reas nehet d'ar gêr.

— Alin n'ema ket en he imor vad.

— Mad, ne vezo ket lavaret e vezom-ni peurien, eme Rozali; distro d'ar bourk da brena unan nevez.

— Peleh?

— Daoust ha me oar-me? N'e-pezo nemed goulenn.

Chamar a yeas da genta d'ar hovel.

— Penaoz, Bate, ne garfes ket ober eur rectum nevez din-me?

Ar marichal a zirollas da hoarzin ken e tarbas

mouga.

— Ne ouien ket oas eur farser e mod-se, Chamar. Ale, deus da gemer eur banne.

War-lerh ti ar marichal, Chamar a zoñjas mond da di ar haboser. Hemañ a oa eur paotr laouen. Pa glevas komzou Chamar, eh ijinis ober eun taol fin dezañ.

— Eo 'vad, Chamar, gouest on da ober unan nevez dit, med da wriad anezañ en e blas, e rankfen kaoud sikour eur gemenerez ablamour m'he-deus-hi nadoziou moannoh eged va re. Ma fell dit mond da houlenn digand Liza an ti all.

Chamar, divalis, a yeas beteg ti Liza. He fried eo a deuas da zigeri an nor. Pa reas Chamar e houlenn, e welas eur mellad dén fuloret-oll o sailla warnañ en eur youhal :

— 'Peus ket 'véz? Par louz!

Ha stlapet Chamar, dre foñs e vragez, en tu all d'an hent. Pa zavas, e yeas d'ar gêr war-eün, losteg a hellit kredi. Siwaz, ar boan gov oa atao warnañ!

— Deus amañ, 'lavaras dezañ Rozali; me am-eus gwelet d'ar wech lonka al louzeier gand eur werennad zour; 'peus nemed ober memestra.

Chamar a lonkas evel-se e zupozitoariou, med parea ne reas ket, nemed pa blijas gand Doue tenna ar jofadurez ⁽¹⁾ diwarnañ.

Eur miz da houde, eh erruas gand ar medisin :

— Ha neuze, va mignon, pare an dud? Mad oa va zupozitoariou?

(1) chofadurez : tan-bouzellou

— Ya, koulz am-befe greet planta anezo en diadreñv, mab-ar-hast fougaser!

Eur plah yaouank dilu

E gar Montroulez, eur paotr yaouank a zavas en treñ evid mond da Vrést.

Mond a reas da azeza e-kichenn eur plah yaouank vrag; ken brao oa ma ne helle ket dizellet diouti beteg ma oe chalet ar plah yaouank gantañ.

A-benn eur pennad, homañ 'lavaras dezañ :

— Ma roez din dég lur, me 'ziskouezo dit va hov-garr.

Ar paotr, rekouret, a zispakas kerkent eur pez a zég lur hag ar plah a ziskouezas dezañ he hov-garr en eur droñsa eun tammig he lostenn.

War-lerh eun taol chañs e mod-se, ar paotr a zelle muioh-mui ouz ar goantenn. Erruet e Landi, e lavaras adarre d'ar paotr :

— Ma roez din hanter-kant lur, me ziskouezo dit va fenn-glin.

Ha tapet hanter-kant lur all gand an dimezell.

Bremañ an tamm killog a zoñje e-noa eur chañs bennag da vond larkoh; e zaoulagad a rigadelle war ar plahig gwasoh eged luhed.

En em gavet e Landerne, e kinnigas dispont dezañ :

— Kant lur hag e tiskouezin dit e peleh on bet operatet diouz an apeñdisit.

Kerkent oa eur billed a gant lur war he barlenn.

— Mad, emezi, deus amañ e-keñver ar prenest.

Hag e tiskouezas dezañ klinik Sant Luk a zo eno harp ouz ar gar.

— Sell mad, va dén, aze on bet operatet diouz an apeñdisit.

Diwar ar gentel-ze, ar paotr yaouank a gase gantañ eur gazetenn pa gemere an treñ, divisoh oa.

Biz bihan an aotrou person

Aotrou person Kerelon a zo eun iskiz a zén; ne ra netra evel ar re all, med en em hreet eo e barrizioniz dioutañ.

Pa vez eured er barrez, eo red d'an dud nevez eureji en ti-kêr en deiz a-raog.

Red eo dezo ivez digas dezañ, en deiz a-raog, o gwalennoù eured.

Gand aon na vefent dizoñjet da zeiz an eured, gand an dud yaouank pennou skañv! M'ho tesko!

Setu petra hoarvezas deiz eured Izidor Vraz ha Mimi Zu.

Renket eo peb tra evel kustum. N'eo ket brao mond a-eneb froudennoù ar person, laouen e benn gantañ o hortoz an dud da zond en iliz.

Gwalennoù eured an daou zén yaouank a zo aze dirazañ, en eur voestig vrag, bourrellet seiz en diabarz.

Diou walenn aour, mar plij!

— Va Doue, eme ar person outañ e-unan, pegen bihan eo gwalenn ar plah yaouank! N'helllo biken lakaad anezi war he biz! A-veh ma hellan-me he lakaad war bég va biz bihan!

War ar bég nemetken. Med c'hoant a zav gantañ bounta war ar walenn... eun tammig bihan... eun tammig all c'hoaz... Ema eet dreist mell ar biz...

— N'eo ket ken bihan ha ma soñjen, eme ar person outañ e-unan atao. Mond a ra dreist ar mell, larkoh eged plég ar biz bihan.

A-greiz-toud, setu dor ar sekreteri o tigeri gand ar sakrist o tond e-barz.

— Erru an dud, aotrou Person.

Trumm e klask an aotrou Person tenna diwar e viz gwalenn eured ar plah yaouank.

Siwaz! Ar walenn ne fell ket dezi senti! Aze ema hag aze e chom, dres en tu all da blég biz bihan an aotrou Person.

Digor braz eo bremañ dor dal an iliz. Poent eo d'an ograouer c'hoari gand e ograou.

Dall eo ar muziker paour. Ne wél ket eta nag ar beleg, nag an aoter, nag an dud o vond hag o tond en iliz. N'eus forz! N'eo ket chomet nehet an aotrou Person dirag ken nebeud a dra.

Etre ar sekreteri ha leurenn an ograou e-neus lakeet eur zonerez tredan. Eun taol biz-meud war ar zonerez, hag ar muziker, raktal, a vez e grabanou war touchennou e vinkanik.

Ha sonadenn en-dro! Tregerni 'ra an iliz! Ya...

med biz-bihan an aotrou person a oa atao er griped.

— Deus 'ta, Job, da denna ar walenn-mañ din diwar va biz.

Chob a glask kompren ar pez a wél dirag e zaoulagad, difoupet braz gantañ.

Gwalenn ar plah nevez war biz-bihan an aotrou Person! Biskoaz kemend-all! Gouzoud a ra Chob eo iskiz e berson hag e tro buan ar sorhennou en e benn... Alato!...

Leun-chouk a dud eo an iliz, ha savet an dud-nevez beteg ar penn uhella, war an diou gador renket aze evito dirag ar balustrou.

Kaer e-neus an aotrou Person tufal ha tufal war e viz-bihan, trei ha distrei ar walenn warnañ, ha Chob war e zikour, ne deuont ket a-benn da zivizaouedi biz-bihan ar person.

Setu tavet an ograou... an ograouer dall a zoñj dezañ eo poent kregi gand an overenn... Med ar walenn a zo atao war biz an aotrou Person.

— Chob, emezañ, kerz 'ta buan da glask din eun tamm soavon pe eur banne eoul.

D'an daoulamm e treuz ar vered, stok outi ar presbital eüruzamant.

Serret eo an nor war ar presbital.

Eet eo ivez Marijan, pa glevas ar hleier, da zelled ouz an dud nevez o tremen dre ar bourk.

Hir e kav an amzer, ar paour-kêz aotrou Person!

E peleh 'ta eo chomet Chob ar hloher?

Chomet eo da furchal e greñch ar presbital.

Eno e kav eur podadig lard melen a zervij d'an aotrou Person da gempenn e oustillou.

— Setu amañ, aotrou Person.

Ha lard war ar biz-bihan, ha war walenn eured ar plah nevez, na petra 'ta!

N'eus trouz ebéd ken en iliz.

Sioul ar hleier!

Sioul an ograou!

Sioul an dud!

... Eun taol biz-meud war ar zonerez tredan, ha paotr an ograou, heb kompren netra, a zistag adarre eur pezh sonerez. Biskoaz n'eus bet eured gand kemend a vuzik!

— Ema deom, Chob, eme ar Person, deuet a-benn da denna e viz-bihan diouz ar griped.

Med, gouzoud a rit, goude larda eo red dilarda, biz-bihan an aotrou Person ha gwalenn aour ar plah.

Eun tammig diskrohennet eo biz ar beleg.

A walenn aour he-deus kavet he lufr hag he neizig bourellet seiz.

Ano 'béd ken euz diskrohenna, na larda, na dilarda!

Daoust ha dizonet eo bet an aotrou Person?

Daoust ha torret eo bet dezañ da-vad e hoant c'hoariellad gand gwalinier an dud nevez?

N'ouzon ket!

Chob ar hloher n'e-neus ket lavaret din.

Na va "biz-bihan" kennebeud!

(An istor-mañ a zo bet kinniget din gand an Tad Medar a blije kement dezañ c'hoarzin).

Daoulagad mad

Daou archer a zo o vond gand o hent.

— Sell 'ta, eme an hini kenta, eun elikoptèr brao.

— Neket, eun elikoptèr vrao eo, a respontas egile.

— O! na te 'peus daoulagad mad, pa welez an dra-ze euz ahalenn! Te 'peus chañs!

Bioh ar paotr koz

Eur paotr koz a zo o ouela forz e-kichenn e vioh varo.

— Mantruz eo, a lavare, bremañ p'am-oa desket anezi da jom heb debri!

Ki Plogoneg

Pell 'zo bremañ, e Plogoneg, oa eur pabor a giger. Pinvidig oa ha rog an tamm anezañ, me lavar deoh. Rog ouz e wreg, rog ouz Ifig e vevel yaouank. Padal e ouie ober lagad mignon da Gatellig, pa veze e-unan ganti er gêr.

Ar higer e-noa eur hi disheñvel, eur mellad ki rouz, spered toud dezañ, Medor e ano.

'Pad an deiz e veze klevet ar higer o fougeal e gi : Medor en tu-mañ, Medor en tu all... Gwir eo

oa Medor eur sapre ki. Bemdez e veze gwelet o treuzi ar bourk, eur baner a-istribill ouz e henou, gand eur billed e-barz, o vond da di Vari Lakouch, da gerhed an diankachou pe c'hoaz, ar gazetenn d'e vestr.

Evel-se, Medor a veze moumounet gand ar higer.

— Henez, ma ouije kaozeal, a lavare, 'vije ar gwella euz parrizioniz Plogoneg; ne vank dezañ nemed gouzoud kaozeal!...

— Ya, a zoñje Ifig, ha me 'vije er baradoz ma vefe greet hanter ken brao din ha d'ar hi-ze.

Med koulz oa dezañ chom sioul ma felle dezañ dalher e blas.

Ifig n'oa nemed eur zorhenn en e benn : mond da ober eun droiad da Bariz kerkent ha m'e-nije gounezet arhant a-walh da vond.

Dre forz huñvreal e Pariz, e teuas eur menoz en e spered. Setu an taol fin a hoarias d'e vestr.

Eun dervez e yeas diwar-herr d'e gaoud :

— Selaouit 'ta petra 'm-eus klevet...' Vid doare, e Pariz, 'z eus nevez digoret eur skol e leh ma vez desket kaozeal d'ar chas!

— Hañ! Gwir a lavarez?

— Ya, sur on.

— Kér e tle koustoud?

— Kerig a-walh, med ne bad ar skol, evito, nemed eiz dervez. Petra vo an dra-ze deoh-c'hwil?

— Ha penaoz e rin va hont? N'on ket evid kuitaad va stal e-pad keid-all!

— Ma karit, me hellfe mond gantañ.

— Mad, kee neuze, me baeo ar mizou, med diwall ma ne gaoze ket Medor da houde.

— Sur e raio, ha tud Plogoneg a vije gouest da lakaad anezañ da vêt zokén.

— Bon, hast afo renka an traou; warhoaz vintin e rankoh loh abred.

Setu prenet eur billed treñ da Ifig hag eun all d'ar hi.

Hag int o-daou da Bariz.

Er gapital, kerkent ma erruas, 'giz ma lavar ar ganaouenn, Ifig hoanteas mond da bourmen, e gi diouz e heul.

A-greiz-toud, eun dimezell vrao, evel ma n'oa hini ebéd e Plogoneg, a deuas da glask toulla kaoz gand Ifig.

Bez' e oa ganti eul lostenn verr spontuz, eur boutou gand seuliou uhel-uhel hag eun tammig sakoch farsuz. Ouspenn oa livet he muzellou, he daoulagad, he ivinou hag all...

— Deus d'am heul. Me ziskouezo toud Pariz dit, emezi.

Ifig ne jomas ket da dorta, hag eñ war-lerh ar goantenn.

Siwaz ar paour-kêz Medor, o klask heulia anezo, a oa speget gand eun otobus, ha friket war an taol.

— Gast! eme Ifig. Kouiket Medor! Petra lavaro ar mestr? Eüruzamant 'm-eus eiz dervez dirazon da glask eun abeg bennag d'en em denna. Deom atao da weled Pariz gand homañ.

Ar vizit a badas beteg al liard diweza e yalh

Ifig; neuze avad, oa poent klask eun digarez kreñv a-walh ma felle dezañ kendalh da vizita.

Mond a reas da bellgomz d'ar higer.

— Alo! Amañ Ifig.

— O va Doue! Ha Medor?

— Kaozeal a ra; labouret mad e-neus hag ar groaz a zo gantañ.

— Mad eo; deuit d'ar gêr neuze.

— Beñ, ar pezh 'zo, Medor a lavar geriou, med ne oar ket ober frazennoù c'hoaz. Ar skolaer a lavar e vije red dezañ chom eiz dervez all... ma fell deoh digas eur chekenn din da vihanna, rag lipet eo va moneiz.

Ar higer sod a gasas eur yalhad all da Ifig, a gendalhas da vizita Pariz gand e goantenn.

Er zizun da houde, supet ⁽¹⁾ Ifig adarre!

Ha bremañ, petra da ober? Red e vije en taol-mañ anzav oa flastret Medor.

Setu Ifig, eur wech all, da kaozeal ouz an telefon.

— Alo! Amañ Ifig.

— Ahanta! Erru oh d'ar gêr, neuze?

— Ya, ya, 'maom erru.

— Ha Medor? Kaozeal mad a ra 'michañs?

— Feiz ya, beteg re zokén, ne baouez ket da varvaillad; eur chaoger disheñvel eo!

— Mad eo, mad eo; mall 'm-eus d'e weled.

— Eñ 'n-eus ivez, me lar deoh; 'pad an deiz e vez o houlennoù ano euz Plogoneg. Diwar-vremañ,

(1) supet : n'e-neus gwenneg ebéd ken.

emezañ, ne vezin ket inouet kén, peogwir e hellin kaozeal gand pratikou an ti... Ha va mestr? Daoust hag atao e vez war-dro Katellig pa vez eet ar vestrez da foar Gemper?

— Petra? An dra-ze 'lavar?

— Ya, ha sklêr e vouez c'hoaz.

— Mad, selaou ahanon, deus d'ar gêr dioustu, ha léz an tamm lanfre-ze e Pariz.

Anad deoh n'oa ket bet ezomm da bedi Ifig diou wech.

Eun den heb dorn

Biel a zo eur farser evel ma n'em-eus ket ana-vezet kalz.

Dija, p'edo er skol, oa brudet evid e droiou-kamm. D'ar mare-ze edo er skol loja e Kastell-Paol. Ar zul a oa, Biél puniset eur wech muioh, a ranke chom er skol e-leh mond d'ar gêr.

Goude lein oa e-unan-penn o rodal dre borz ar skol, teñval e benn a hellit kredi.

— Gast! eme Biél, me ne jomin ket amañ da vuntri ⁽¹⁾ beteg emberr

En tu all d'ar voger e kleve ar foar-yén o vond en-dro, ar pezh a greske e hoant tehed.

Edo o prederia war an doare gwella da gas e daol da benn, pa welas eno, speget a-dreñv eun

(1) muntri : chom diskrog, chom.

nor, eur belerinenn zu, unan hir, chomet war-lerh eur skolaer bennag, kredabl braz.

— Sell 'ta, eme Biël, gand homañ e hellin mond er-mêz euz ar skol heb beza anavezet.

Kerkent eo gwisket ar belerinenn gantañ ha boutonet piz beteg an traoñ.

Ha Biël e kêr, laouen evel ar spered santel.

Eur mor a dud a oa er foar; c'hoarz ha muzik forz pegement.

N'oa ket a-walh d'ar paotr beza tehet euz ar skol; eun taol fin a ranke ober evid kaoud e walh a blijadur.

Setu petra 'ijinas ar hanfard :

Pa erruas war ar blasenn e-touez an engroez vrasa, e yeas eun nebeud a-gostez, e kroazias e zaouarn a-dreñv e gein dindan e belerinenn, hag e stagas da zaoublega ha da vresa en eur glemm truezuz.

An dud, evel just, a jome nehet da zelled outañ.

A-benn ar fin, eur gwaz a-zoare, gand zokén eur rozetenn ruz ouz e vruched, a dosteas da hou-lenn digantañ :

— Arsa! Paotr yaouank, petra hoarvez ganez? Seblantoud a rez gouzañv kalz!

— O! va dén mad, eme Biël, me 'zo eur paour-kêz maleüruz, aflijet braz e-giz ma welit, peogwir n'em-eus dorn ebéd, hag allaz! falvezet ganen hirio ober eun dro foar-yén heb va Noun, a ra noz-deiz war va zro.

— Ha petra vank dit evel-se?

— C'hoant troaza 'm-eus ken a freuz va zoro-

hell ouzin.

— Ale! ale! Ha n'eo nemed an dra-ze! Ne ya ket d'en em jala pelloh. Kristenien om emichañs! Deus amañ e gwask an ti-mañ, ha me 'zikouro ahanout.

Hag an dén madelezuz kregi da ziboutona e vragez d'ar pabor ha d'e lakaad da zizoura e gorr, ar pezh a reas a galon vad, gwasoh eged ma n'en -dije ket bet a dro d'hen ober abaoe eiz dervez!

Pa oe echu e lennad gantañ, e oe klozet dezañ kempenn war e beadra.

— Biskoaz, aotrou, ne ankounac'hain ahanoh, a lavaras Biël d'an tremener, en eur heja e benn, kabluz.

— Mad eo, va faotr; evelato eo furroh dit distrei buan d'ar gêr bremañ.

— Hañ! Feiz ya, emañ o vond dioustu; lezit ahanon hepkén d'ho trugarekaad, va dén mad, ha da lavared deoh kenavo! eme ar pezh ifrontet, en eur zispaka euz dindan ar belerinenn zu eun dorn ken seder ha va hini-me, evid e astenn laouen d'e zalver sebezet!

Eur skwér fall

Anton zo e vicher bleina kamionou braz evid chalbotad marhadourez euz an eil penn d'egile d'ar vro. Bemdez e vez war an hentchou.

Er wech-mañ eo bet o kerhed eur mil a yér e

Landi evid o has da Rungis.

War ar memez tro e-neus kavet da brena eur peroked d'e dintin Mari, o chom e Pariz, ha pell 'zo o klask kaoud eur seurt lapous. Ar peroked zo taolet e-touez ar yér, ha yao!

Pa erruas Anton en tu all da Vontroulez, e welas war vord an hent eur plah yaouank o c'hoari biz-meud.

Anton, kalon vad dezañ, a jomas a-zav dirazi.

— Da beleh e yez, plahig?

— Da Bariz.

— Me 'zo 'vond ivez, ma karez, e teui ganen.

Hag hi e-barz ar hamion.

Anton a oa eur paotr laouen ha dizoursi. Dious-tu e klaskas toulla kaoz gand an dimezell. Siwaz! ne responte nemed ya ha nann!

Gast! a zoñje Anton, tapet 'm-eus eur sapré turzunell; gand homañ ne vezin ket bouzaret!

Memestra, a-benn eur pennad, e soñjas ober al léz dezi, med ar plah a spontas ouz e zelaou. Neuze Anton a jomas a-zav hag a houlenas :

— Selaou, dimezell, ya pe nann?

— Nann, emezi.

— Mad, sodenn vihan, er-mêz neuze, ha klask eun oto all pa gari.

Da houde Anton a gendalhas gand e hent, seder atao ha diremorz.

Pa en em gavas e Rungis, ar pabor a yeas da eva eur banne kafe tomm. Anavezet e oa eno; e gamaraded a zeuas war e dro.

— Ahanta, Anton, petra zo ganez hirio?

— Eur hastad yér hag eur peroked da va zintin Mari.

— Eur peroked? Diskouez anezañ deom 'ta!

Setu ma oa digoret dor vraz ar hamion. Amañ avad e kouezas meudig ar ganfarded en o dorn.

E-barz ar hamion ne jome ken nemed eur yar ha c'hoaz oa ar peroked, krog en he fenn a-dreñv, o houlenn rog diganti :

— Ya pe nann? Mad, er-mêz neuze, 'vel toud ar re all!

Perag gouela?

Ar halvez bihan a zo tremenet p'edo o chom e-tal al lenn vraz.

N'o-doa nemed eur gambr enno an daou wele,

tost an eil d'egile.

War unan anezo edo-eñ

astennet ha lienet;

War an hini all edo-hi

kousket ha klañv gand ar gozni.

Dond a ra meur a hini

da deuler dour war ar horv.

An amezeien a ouie lakaad kemm

etrezo o-daou

ha piou a oa maro

ha piou a oa beo.

Ar re all, en damskeud, a jome nehet, ne ouient ket war pehini

teuler an dour benniget.
Ar re a oa azezet o pedi,
pe gand o biz pe gand eun taol lagad
a ziskoueze dezo gwele an hini goz.
Pa goueze war he fenn
ar beradou dour yén
e tihune gand eur skrijadenn.
Pront goude e kouske adarre
da hedal eun all da ober kemend-all.
Paour-kêz kalvez bihan!
C'hoarz 'ta gand ar farserien!

(An istor-mañ, gwir bater, a zo bet kontet din gand an tad Alexandre
Seite, skrivagner ha ginidig euz Rosko).

Divinadennou

Peder dimezell noaz o vond d'ar foar, dindan
ar glao ha n'int ket glebiet an disterra. Piou int?*

— "Perag e vez atao lakeet eur hillog war bég
an tour?"*

(1) gweled ar respont e fin al leor.

E miz mae
Ken tener ar brinig hag ar rae.

An dra-ze ne ra droug da zén
Hag a ra vad da zaou.
Ar Juloded a zo greet
Gand gwad silet
Ha kig dispartiet.

Eur pratik a houlenn digand gwreg ar higer :
— Daoust hag ho-pije feskennoù raniged?
— O! n'em-eus ket, kredabl, ablamour d'ar
remm eo 'maon o vale evel-se.

Klevet e korn ar ruiou gwechall, pa ne oa ket
c'hoaz a brivejou er hêriou :
— « A la puché, Madame »
Dindan mantellig-me.
Tri gweneg ar plég ha goude ma rafer dég,
Daou wenneg ar bramm ha goude ma rafer
kant.»

Eur skoliad bihan : Toud er zah, netra er penn.
Eur skoliad braz : Toud er penn, netra er zah.

Trei e galleg:

Berr eo warnon : *il est court sur moi.*

Va hov-garr : *le ventre de ma jambe.*

Amañ eo tomm e skoaz du-mañ : *ici, il fait chaud à l'épaule de chez nous.*

Beza maout war ar hig-moh : *être mouton sur le cochon.*

N'emaon ket war va zu : *je ne suis pas sur mon côté.*

Enouet eo va haset ganez : *ma caisse ennuyée avec toi.*

Penaoz e vez lavaret *soutien-gorge* e brezoneg?
Respont : Dibrader.

Anoiou-kizier

Kaz-tro	Kaz-Iman	Kaz-uhel
Kaz-dei	Kaz-troh	Kaz-zisur
Kaz-tiz	Kaz-ganez	Kaz-i
Kaz-el	Kaz-Imir	Kaz-Anova
Kaz-arh	Kaz-Pienne	Kaz-Ablanka
Kaz-Ern	Kaz-Imodo	Kaz-gueule
Kaz-crouête	Kaz-kou	Kaz-pipe

Kaz-tagne	Kaz-cade	Kaz-Ba
Kaz-kon	Kaz-aque	Kaz-kète
Kaz-sis	Kaz-ku	Kaz-kidi
Kaz-kifait	Kaz-keuc'est	Kaz-kiveu
Kaz-kifo	Kaz-tu bois	Kaz-kifou
Kaz-konfai	Kaz-toa	Kaz-kon s'amuse

— Me oar e peleh ne vezo ket a reo emberr.

— Peleh 'ta?

— Etre Chamar ha me.

— Penaoz 'kav deoh e vez tennet an dent er Rusi?

— Dre ar penn a-dreñv eveljust, pa n'eus ket urz da zigeri ar genou.

— Beb pegeid ho-pevez darempredou gand ho maouez? a houlenñ eur medisin digand eun toul-lad gwazed deuet da zelaou e brezegenn diwar-benn ar reiz.

Bemdez, a respont lod; beb sizun, lod all; beb miz, unan bennag, hag er penn a-raog unan koz, atizet-oll, a lavar gand eur vouez skiltr :

— Eur wech ar bloaz.

— Hopala! tad-koz, hag oh ken enervet-se?

— Emberr eo!

Lady Di a zo fellet dezi mond dre guz da vizita karter ar re baour hag hi da floura penn eur bugel.

— Ha neuze, bihan, n'emaout ket er skol hirio?

— Gast! nann, itron, re a laou 'm-eus!

Hamon hag e genderv a zo eet da Bariz hag, eveljust, o-deus klasket bizita kement ha ma hellent.

Siwaz! amañ oa pigell! nag a dud! nag a otoiou! n'oa ket êz beaji en eur gêr e mod-se.

A-greiz-toud, p'edont o treuzi eur blasenn vraz dre ar berra, klevet eur vouez o huchal warno, euz eun oto :

— E! peizant!

— Klev 'ta, Hamon, hemañ 'anavez ahanom!

— Perag pa vez eur Belj o staotad ouz eur voger, homañ a bil?

— An hini furra 'gustum plega.

— Hag e-peus daouzeg a vugale, Ifig? Euz ar memez gwele?

— O! n'int ket! Tri 'zo euz ar halatrez ha pèvar euz ar waremm bella.

Tad-koz a zo eet da eva eur banne en ostaliri ha lezet Pèrig, e vab-bihan, e-unan er harr.

Pa deuas en-dro, edo Pèrig o ouéla forz.

— Petra 'zo, va mabig?

— Ne hellom mui mond d'ar gêr; ar marh e-neus kollet toud e esañs.

Red eo lavared oa Pèrig eur Parizian ha n'endoa ket gwelet kalz a gezeg o staotad war paveou kêr.

— Gwelloh 'rafes, Cheun, mond da gaoud medisin braz Montroulez ma chom gwasket da galon, a lavare dezañ e vignon.

— Ro peoh din, eme Cheun, va gwreg a zo dindan hennez daou vloaz 'zo ha ne ra netra ebéd dezi... eur glapez, setu toud petra eo!

Aorelian, c'hweh vloaz dezañ, a zo o selled ouz e dad o planta kaol el liorz.

— Alato, emezañ, e-touez kemend-all a gaol em-bezo eur breur bihan!

(An istor-mañ a zo gwir. Aorelian eo va mab bihan, 7 vloaz eo bremañ, siwaz n'eus bet breur bihan ebéd atao!)

— Pa errui er baradoz, Maze, petra ri da genta?

— Klask eur plas mad da azeza, anad dit!

— Ma vijez "poli" e yafes da genta da zaludi Adam, da dad kenta.

— Ya, med penaoz e anaoud e-touez kemend-all a dud?

— N'eo ket diêz, n'eus nemetañ ha n'en-dije bouton-kov ebéd.

Eur vaouez o klask beza moumounet a houlen digand he fried :

— Petra 'blij dit ar muia dit, eur vaouez vrao pe unan speredeg?

— Nag an eil nag ebén; te eo a blij din, a respontas dineh an ozah.

Daou viliner a zo bet o koves da vareou Pask.

War hent an distro, unan a zo teñval e benn hag egile 'houlen digantañ :

— Feson, Cheun, 'peus ket bet da Bask?

— Nann, siwaz! Ha te?

— Me 'm-eus tapet va hini.

— Penaoz 'peus greet da gont? Te 'zo ken laer ha me ivez koulskoude.

— Petra 'peus kontet er gador-goves?

— Me 'm-eus lavaret oan kustum da lakaad brenn e-touez ar bleud.

— Genaoueg! Ma karfes beza lavaret e lakeez bleud er brenn!

Evid kaoud patatez braz en ho parkeier, lakaad ganto abon olifant.

Perag er Rusi an aotrou Brejnev e-neus lakeet distruja kement turzunell a oa er vro?

— Ablamour ma reont Krou-krou, krou-krou, krou-krou.

Ar hemmaduriou buan hag êz

Kemered ar geriou **Kaol** ha **Gaol** hag ober frazennoù ganto :

Da skwér :

Taol da gaol war va harr.

Taol da haol war va harr.

Taol da haol war va garr.
Taol da gaol war va haol.
Taol da haol war va gaol.
Taol da haol war va haol.
Ro din da gaol evid va haol.
Ro din da gaol evid va gaol.
Ro din da haol evid va haol.
Ro din da haol evid va gaol.
Ober gaol da glask kaol.
Ober gaol da glask gaol.
Kaol war gaol.
Gaol war gaol.
Gaol war kaol.
Gwalhi va gaol da lakaad er zoubenn.
Gwalhi va haol da lakaad er zoubenn.
Kaol Soaz a zo skornet.
Gaol Soaz a zo skornet.
Louzaoui he haol.
Louzaoui he gaol.
Louzaoui e gaol.
Louzaoui e haol.
Kaol ruz.
Gaol ruz.
Tomma kaol.
Tomma gaol.
Kaol ledan.
Gaol ledan.
Kaol brein.
Gaol vrein!

hag all... hag all...

D'al lennerien da glask ar rest.

Respontchou d'an divinadennoù

- (1) Peder bronn ar vloh.
- (2) Ma vefe lakeet eur yar e torrfe he viou o koueza d'an traoñ.

Taolenn

Eur gerig en a-raog	5
Al lizerenn "A"	7
Promesaou tra kén	7
Leskit 'o	8
Kentel ar helenner meur	9
C'hoari geriou	9
Istor ar melezour	10
Eun dén mezo-dall	12
Ar "moñtr-bracelet"	13
Ar boutou-koad	14
Ar zuterez	16
Lost ar hi	16
Va gwreg ha va dous	17
An den ne ouie ket neuï	17
Ar "gref"	17
Ar marhadour rochedou gwazed	18
Ar paotr-yar	19
Chamar	19
Ar breur bihan	20
An istr	20
"Deux amants"	21
Paotr e vlevenn nemeti	21
Ar hillog nevez	22
Ki ar hantreer	22
Bioh Jakou	23
Béz an olifant	24
Kaz-troh an ostaliri	24
Al loa-goad er volennad lêz	25
Ar haz "Baba"	26
Eun tad-koz yah	27
Alanig er skol	27
Er skol gatekiz	28
Re zo re	29
E ti ar pastecher	30

O tistrei euz ar Salette	30
Klañv ar bouh	31
Ar perhenn nevez	31
Ar haz gwalhet	34
Tremen 'ra peb tra	34
Kontchou moh	35
O teski brezoneg	35
Pariadeg Person Kerlouan	36
Ra jomo yah da zaoulagad atao!	36
Kas anezi ganez	37
Eul lonker	37
Eur sapre dozverez	38
Ar sakrist o sikour kovez	38
Ar vragez he boutonou a-dreñv	39
Va pe On?	40
Sutéréz en iliz	41
Eur vamm-goz aveleg	42
An dour Lourdez	43
Ar goarenn-veur	44
Dirag kraouig Nedeleg	45
Eur penn-skañv	46
Chamar er harr-kañv	46
Paour-kêz baot!	49
Eur roue droug	50
Priz ar billed treñ	51
Bernia pe leda	52
Eun telefon da gaozeal gand ar re varo	52
Eur wiz speredeg	54
Roudou an daoulin	56
Ruz pe zu	57
O ruza e Pariz	57
Bazizien a zo tud seven	59
Ki ar Botorelled	59
Penaoz gouzoud?	62
E Bro-Spagn	62
Diêz spontuz	63
Eun azenn prisiuz	64
Eur remed mad	64
E baradoz an douar	64
Par pe barez?	65

Stajidi difin	65
Evid piou voti?	66
O teski galleg er skol	68
E toull dor ar baradoz	69
Ar rectum	69
Eur plah yaouank dilu	72
Biz bihan an aotrou person	73
Ki Plogoneg	77
Bioh ar paotr koz	77
Daoulagad mad	77
Eun den heb dorn	81
Eur skwér fall	83
Perag gouela?	85
Divinadennou	86
Anoiou-kizier	88
Ar hemmaduriou buan hag êz	93
Respontchou d'an divinadennou.....	95

Heb mizou-kas da baea.

Nevez-embannet

Visant Fave : War roudou or Misionerien.

embannet gand Ar Skol dre Lizer.

« *Un Breton sur chaque motte de la terre,*

Un Breton sur chaque lame de la mer », a skrive St Pol Roux.

Ken gwir all e vefe skriva : « Eur misioner euz Breiz - ha memez euz Eskopti Kemper - e peb bro euz an "Trede Béd". Nag a dadou hag a zeurezed, abaoe pell 'zo, zo eet evel-se d'ober war-dro tud ar broiou pell, o kas dezo o relijion, med gwellaennou en o buhez war eun dro.

Karget e oa bet an Aotrou 'n Eskob Visant Fave d'ober war-dro ar visionerien-ze. Eet eo da weled anezo, evel just, hag e komz dim euz o buhez, diêz aliez-kenañ, med ken entanuz. Ouspenn - ar pezh a vo marteze ar peb dudiusa evid al lennerien ordinal - e oar selled Visant Fave ouz ar broiou-ze, o doareou-beva, an oll draou-ze ken disheñvel evidom-ni, ha ken dedennuz.

Komz euz brezoneg Visant Fave, n'eus ket ezomm. Gouzoud a ra pep hini ez eo unan euz ar re wella a heller lenn.

Eul leor 312 p. (120 lur), (114 lur evid izili Kleub al leoriou), heb mizou-kas, e ti **Mesidou**, 40 bis, ru ar Republik, 29200 Brest.

Ar Vro-Bagan : Kenavo my love

embannet gand Brud Nevez.

Anavezet mad eo **Strollad ar Vro-Bagan** gand an oll Vrezonegerien. Amañ e vo kavet tri fezh-c'hoari : **Kenavo my love**, a zo stourm "ar re goz" hag "ar re nevez", **Ar Spontail**, leun a deneridigez, ha **Roue ar Moh**, eur pezh a zo bet c'hoariet e gwirionez etre tud parreziou bihan ha "peizanted" vraz a felle dezo paraforsi an ekonomiezh. Da bep hini da varn!

168 p. 56 lur (Priz Kleub al Leoriou Brezoneg : 53 lur).

Yann-Vadezour an Deñv : Daou stourmer Breizad F.T.P.F.

embannet gand Brud Nevez.

Golo gand **Xavier Morvan**.

Ar Rezistañs! eun amzer euz ar re entanusa e Istor Breiz, pa oa da stourm a-eneb an Nazied o-doa aloubet or Bro e 1940. Kaset int bet kuit 'mêz gand ar Vretoned o-unan, skoazellet gand ar re Unanet.

Pouezusa amzer on Istor, sur, pa oa an oll Vretoned - nemed eun dornadig bihan-bihan anezo - euz ar memez tu: hini ar Frankiz.

92 p. 48 lur (Priz Kleub al Leoriou Brezoneg : 45,5 lur).

Per-Jakez Helias : Biskoaz kemend-all! trede levrenn, embannet gand Emgleo Breiz.

Ganet ma oa Per-Jakez Helias ha Per Trepos war ar mêz, den ne ouie, daou-ugent vloaz 'zo bremañ, gwelloc'h egeto, petra a hellje didui o henvroidi goude eur zizunveziad labour, ha gand peseurt brezoneg ober : komz ouz an dud evel pa vijed en o zouez o konta kaoz ganto.

Peziou ar bloaveziou 50/57 a zo atao beo-kaer e memor an dud o-deus o hlevet. Nag a hoarz en amzer-ze! Pebez ebat en-dro da Jakez Krohenn ha da Willou Vihan!

Sur o-devo kemend a blijadur ar re, kalz yaouankoh, a lenno bremañ ar peziou-ze. Ha marteze o-devo ar chañs da weled anezo c'hoariet c'hoaz e leh pe leh.

Eul leor 216 p. 73 lur (69 lur evid izili Kleub al leoriou brezoneg).

Goulennit al leoriou dre lizer, heb mizou-kas, digand
Mesidou, 40, ru de la République, 29200 Brest.
Pellg.: 98-80-49-70.

Trist ar Vretoned, sañset! Eur menoz o tond dim euz amzer ar Romantelez ma'z eus unan. Tristoh e vefe tud Leon eged tud Treger, ha dreist-oll tud Kerne? 'Gav ket din. M'o-deus lakaet Youenn Drezen ha Maria Prat ahanom da hoarzin kement ha kement, sed amañ bremañ **Naig Rozmor**, eur varzez anezi, savet ganti **Kant Istor Farsuz** evid or brasa diduamant.

Sur o-devo an oll Vretoned eur blijadur dreist o lenn anezo, ha goude-ze oh adlavared anezo e fin eur préd mad!